

KONFERANSOU

ann

Aotrou J. Quéré

Maro Person e Kastellin



STEUEN EVIT KONFERANSOU

var

Gourc'hemennou Doue



BREST

MOULLEREZ RU AR C'HASTELL, 4

1907

Diocèse de
Quimper & Léon

Document numérisé en 2015

KONFERANSOU

Ann Aotrou J. Quéré

Maro Person e Kastellin

STEUEN EVIT KONFERANSOU

VAR

GOURC'HEMENNOU DOUE

KENTA KONFERANZ

*Si vis ad vitam ingredi, serva mandata,
Mar fell deoc'h mont d'an Env, heuillit ar
gourc'hemennou.*

Araog staga d'al labour, eo red distroueza an hent. Skeul an Env hor beuz da ziskouez, lakaomp an heol da bara varnhi.

— Da betra eo mad : archerien, prizouniou, gillotin?... a lavar al laer, an den fall, ar muntre.

— Daoust ha Doue a vel ac'hanomp?... a lavar an den difeiz
Dixit impius in corde suo : non est Deus.

Perag al lavariou-ze :

Aoun ho deuz rag ar prizon..., etc. Ia, an den digoustianz en deuz *aoun*..., *aoun* rag Doue..., etc.

— An den eon a spered, eon a galon, a gred hag a lavar :

1^o Eun Doue a zo

He hano 'zo skrivet en hor c'halon.

He hano 'zo skrivet var bolz an Envou, var ar mor, var ar vreunen blouz, var bep tra..., evel ma 'z eo skrivet hano ar mansouner var ar voger great ganthan, hano an horolacher var an horolach..., etc.

2^o Doue eo ar Mestr

Holl-c'halloudeg eo : dre gaer pe dre nerz e ranker plega dezhan. Piou benag a glask stourm outhan a goll he boan :

Ouz red,
Remed ebed !

3° Doue eo ar Mestr braz

Kalz mistri a zo hag a gav brasoc'h mestr evitho. Doue eo ar Mestr braz, Mestr an holl ; Mestr ar paour, ar pinvidik, an den a bluen, ar pennou kurunet..., etc.

4° Doue a jomo Mestr

Kalz mistri a vez diskaret ; lod epad ho buez, holl deiz ho maro...

Den na hell diskar Doue.

Kalz a zo bet, lod braz, lod munud, hag ho deuz klasket rei dezhan lamm. Chomet eo en he zav.

Avechou, evit guir, a ra ar vâ da gousket.

Dihun a ra abarz pell, ha pa zihun e ro sklerroc'h da anaout ema atao beo.

5° Doue en deuz guir da veza Mestr

Mistri fall a veler, mistri disleal..., etc.

E Doue ema peb mad, peb furnez, skiant, santelez, lealded, eb kemesk a zroug ebed.

6° Koulskoude, abalamour d'he zantelez en deuz kasouni euz an droug, hag e rank, en despet d'he holl vadelez, kastiza an dizurz.

*Ex natura bonus
Ex necessitate justus.*

Mad, dre bleg he galon ; just, dre faot hon hini-ni. Er bed-ma e kastiz aliez ; er bed all : Baradoz pe ifern..., etc.

Ha kement-ma n'eo nag : *ar bleiz e toull an nor*, nag : *ar patr plouz e kreiz ar park*, da lavaret eo : n'eo ket kement-ma eur spountail evit ar vugale pe evit ar brini.

A Zoue ne vez ket great a c'hoap, hag hen ne glask ket, ken nebeut, ober goap euz ar re all..., etc.

7° Fiat voluntas tua

Hor c'henta, hor brasa dever eo eta klask anaout ar pezh a c'houlenn Doue diganeomp.

Hogen :

Hæc est voluntas Dei sanctificatio nostra.

Doue a ro he c'hraz d'hon harpa.

Doue a ro he lezenn d'hon hench.

Gant graz Doue e hallomp senti ouz lezenn Doue.

Ha lezenn Doue heuillet mad a zo evidomp :

8° Skeul an Env

Ar skeul, da betra eo mad ?

Mad da bignat.

Gant derez, gant skeul e zân d'ar c'halatrez ; eb skeul e choman d'an traon...

9° Red eo senti ouz ar skeul

Ar skeul ne zeuio ket d'ho klask ; c'hui eo a rank mont beteg enni.

Mar d-iit ebion, ne bignot ket....

Red eo pignat baz gonde baz....

10° Red eo he c'hemeret, he ober, ervez ma fell da Zoue

N'euz nemed Doue hag a helfe deski deomp an doare da ober eur skeul vad, evit tizout euz an douar beteg an Env.

Kalz kilvizien..., tud a spered, a zeskadurez, a zavez..., etc., ho deuz klasket ober skeulioù d'ho giz...

Avechou skeul re verr ; avechou koat brein ; avechou grignen, guenn goat ; avechou koat livet..., netra ken... skeul fall !

Greomp eta, ni, hor skeul ervez Doue, gant koat iac'h, en doare merket gant Doue he-unan... Na koat brein, na koat intret, na koat livet faoz... Bizier iac'h, iennet stard... Na bos, na jelen (*fente*), na toull prenv ebed.

Mar kirit, en em zikourimp d'he ober. Euz va c'hostez, me a ziskuezo deoc'h sklear, freaz, didortil, ar virionez guella ma vezo em galloud. Euz ho kostez, selaouit gant evez, ha bolontez vad da renta va c'homzou talvouduz evit hoc'h ene.

EIL GONFERANZ

Skeul ann Env

Daou bost ar skeul, gant ar vaz kenta, iennet mad

KENTA GOURC'HEMENN DOUE

Dominum Deum tuum adorabis, et illi soli servies

Eun Doue ebken a adori
Ha dreist peb tra holl a gari.

V. B. K.

En eur skeul e kaver daou bost, eur post deou, eur post kleiz, ha bizier lakeat a dreuz, euz an eil post d'egile.

E skeul an Env ez euz daou bost ha deg baz.

Ez aan da gomz euz an daou bost-se hag euz ar vaz kenta.

Evit adori Doue ervad pevar dra zo red :

1° Kaout *feiz* en he gomzou ;

2° Kaout *esperanz* en he bromesaou ;

3° Kaout *harantez* evithan hag evit ar pezh a lavar da garet ;

4° Erfin kaout *religion*, da lavaret eo, beza douget da renta da Zoue an enor a dleomp dezhan ; diskuez, a vel kaer d'an holl, hor feiz, hon esperanz, hor c'harantez.

Ar feiz a ra post deou ar skeul.

An esperanz a ra ar post kleiz.

Ar garantez a ra ar vaz kenta.

Ar religion a ra eur ienn stard, e pep penn euz ar vaz.

Koummanset mad ar skeul. Guelomp petra e tle beza pep post, petra e tle beza ar vaz, ha petra ar ienn.

§ I. AR FEIZ

1° Petra eo ar Feiz

Ar Feiz a zo eun donezoun digant Doue a ra deomp *kredi stard...* an *holl* guirioneziou en deuz an Doue-ze diskleriet, pe a lavar deomp an Iliz kredi anezho.

Kredi stard... Doue ne hell nag en em fazia na fazia den.

An Iliz, renet, sklerijennet gant Spered Doue, n'hell ket, ken nebeut, hen ober.

Kredi an *holl* guirioneziou... (1). E komzou an dud e vez aliez, mesk-ha-mesk, gaou ha guir. Ezom e vez da ventaat ho c'homzou (d'ho dispartia).

E komzou Doue, e komzou an Iliz, kemeskaillou ebed.

Kredi an *holl* guirioneziou a zo *artiklou* a feiz.

Ho c'hredi holl, a-bez, ervez spered an Iliz, penaoz benag n'eo ket red ho anaout holl dre ho hano.

Lod a rankomp da gredi ha da anaout dre ho hano. *Credere oportet accedentem ad Deum quid est, et inquireritibus se remunerator sit.* — Kredi ez euz eun Doue hag a rekoumpanso, hag ive eun Doue hag a gastizo. — Kredi, dre ho hano, mister an Drinded, an Inkarnasion, ar Redempcion.

2° Pegen red eo ar Feiz

Sine fide impossibile est placere Deo

Kement e vez great eb feiz n'eo ket atao pec'hed. — Koulskoude, zoken an oberou guella dreizho ho-unan, *mar bezont great eb feiz*, ne dalvezont netra en eternite. Evitho rekoumpans ebed en Env.

Ar feiz eo post deou skeul an Env, red e ve koat iac'h er post penn-da-benn.

Red eo ouspenn e ve hir aoualc'h ar post : arabad krenna pennad ebed.

Eb ar post, skeul ebed. — Gant eur post re verr, skeul fall !

3° Pec'hejou a eneb ar Feiz

Eun amzer zo bet hag e oa guir lavaret :

Ar brezounek hag ar Feiz
A zo breur ha c'hoar e Breiz.

(1) Tour Kreiz-Kear, e Kastel, a zo diazezet war bevar bilier. Evelse e tle beza buez eur christen : kenta pilier, ar feiz ; eil pilier, an esperanz ; trede pilier, ar garantez ; pebare pilier, ar religion. — Mar kouezfe eur pilier, an tour a ve diskaret. Gant ar christen e c'hoarvezfe ar memez tra, mar lezfe a gostez pe ar feiz, pe an esperanz..., etc.

Lezen Doue zo c'hoaz evel eur jaden. Torret eur mell, ar zaill a gouez er punz. Evelse ive mar torr jaden hor feiz, mar lezomp eur virionez benag eb he c'hredi.

(Notes marginales de M. Quéré).

Ar brezounek a ia kuit, pe a zo stlabezet holl gant koz tam-mou gallek treuz.

Ar feiz a ia kuit d'he heul ; bianaat a ra zoken etouez ar re ne ouzont nemed brezounek.

(Danevel pe histor eur benveg laosk he droad, rag ma 'z eo kollet ar ienn.)

Be 'zo tud hag ho deuz kollet ienn ho feiz : douetanz ho deuz ; — diskredi a reont lod euz ar guirioneziou ; — mez ho deuz oc'h anzañ ho feiz..., etc. (1).

Ha petra zo penn-kaoz a gement-se ? Al leoriou fall a skigner ; — ar c'hazetennoù fall a lenner ; — an dud difeiz a heulier.

§ II. AN ESPERANZ

1^o Petra eo an Esperanz

An Esperanz a zo eun donezoun digant Doue, hag a ra deomp esperout grasou Doue er bed-ma ha baradoz Doue er bed-all.

Red eo esperout eb douetanz, mez evel kent en eur grena : *cum metu et tremore...*

Eb douetanz..., rag Doue ne vank morse d'he c'her, ha Doue a bromet, a ginnig he c'hrasou er bed-ma, he varadoz er bed-all.

En eur grena..., rag ar baradoz zo huel ; — an hent zo striz ; — an danjerioù zo stank ; — an diaoul zo fallagr ; — ar bed zo trubard ; — hor zempladurez zo braz..., etc.

2^o Pegen red eo an Esperanz

Guelit al labourer douar... ; guelit ar prizonier ive... — Al labourer a zisparti an had guella ; torri a ra, labourat a ra mad he zouar ; ne zamant ket d'he boan... Pe vo glao, avel, ienien, heol tomm : netra ne viro outhan..., etc.

Esperanz en deuz..., etc.

Guelit c'hoaz an den klanv... Keit hag en deuz esper, e talc'h penn d'ar c'hlenved. Pa vank dezhan an esperanz, da gaout aoun ez euz..., etc.

Setu perag hon tud koz a lavare :

Gant esperanz ha dour ien
E vez bevet meur a zen.

(1) Eur vech eat ar Feiz da goll, eo torret ar vaz a zo guella harp ar galoun, er boan, er c'hlenved ha dreist-holl da heur ar maro. — Tud difeiz o vervel zo ato ankeniuz, avechou spontuz da velet. — Netra ker laouen ha maro eun den a feiz... Kenavo ar Baradoz.

Esperanz ha dour ien ! Setu a-ze poltred ar re ne zavont ket ho esperanz dreist traou an douar. — Guir eo e tleomp esperout madou ar bed-ma digant madelez Doue. « Guelit, eme Hor Zalver, labousedigou an douar : ne hadont na ne vedont..., ha koulskoude..., etc.

(Danevel pe histor an daou intanv... Pe eun all.)

Esperomp eta madou an douar. Evelato dalc'homp sonj mad eur ar gomz-ma :

Esperanz, dour ha bara poaz
A ra beva guelloc'h c'hoaz.

Madou ar bed-ma zo merket gant an dour ien. — An dour a ia en aezen ; — an dour a vag nebeut..., etc.

Ar bara poaz a verk madou ar bed-all, madou an ene ; — ar bara poaz a verk grasou Doue. Grasou Doue a gas d'an Env. — En Env emañ an euzded.

3^o Pec'hedjou a eneb an Esperanz

Daou seurt zo :

Falz-esper ha Dizesper.

Kounta re var hon nerz hon-unan a zo falz-esper.

Histor Sant Per.

Fiziout ebken e grasou Doue, eb kemeret hon-unan tamm poan ebed, a zo falz-esper.

Chom eb ober ar pez zo merket gant Doue, evit skuilla var-nomp he c'hrasou, evel : mont d'an oferen, mont da govez..., etc., a zo falz-esper.

Falz-esper c'hoaz : gortoz e raio Doue tout, var digarez ma 'z eo mad. — Doue zo mad, mez n'eo ket re vad. — Beza re vad zo beza fall, zo beza sot, ha Doue n'eo na fall na sot.

Falz-esper erfin : gortoz baradoz Doue eb kemeret poan ebed d'her gouunit. — Ar baradoz a zo eur rekoumpañz ha nan eun donezoun : *Unusquisque tantum sperat quantum operatur* (Sant Gregor).

Dizesper. — Brasoc'h eo madelez Doue eged fallagriez an den. Dizesperi a zo kaout re nebeut a fizianz e trugarez Doue.

Doue ne c'houlenn nemed pardoni. Dizesperi a zo dianaout an Aotrou Doue. — An dizesper eo a ra da Zoue ar brasa disme-ganz : *Deus charitas est.*

Kaïn o laza he vreur a reaz eur pec'hed braz : brasoc'h pec'hed a reaz o tizesperi.

Judaz o verza he Vestra reaz eur goall bec'hed : brasoc'h pec'hed a reaz o vont d'en em grouga dre zizesper.

§ III. AR GARANTEZ

1° Petra eo ar Garantez

Ar Garantez a zo eur vertuz dreist-natur hag a ra deomp karet Doue dreist pep tra, abalamour dezhan he-unan, ha karet hon nesa evel domp hon-unan abalamour da Zoue.

Henvel eo euz eur vezen, eat he grizioù doun en douar mad ; — savet ploum he beg varzu an Env ; — digoret frank he brankou tro-var-dro ; ha karget holl a frouez mad.

Diou loden a zo enni : loden Doue ha loden an nesa.

— Loden Doue —

Doue a zo ar pezh a c'heller da zounjal a vella, a zantella, a garantezusa... Mad eo bet, mad eo, mad e c'houlenn beza c'hoaz en hor c'henver.

Red eo eta her c'haret dreist peb tra, euz hon holl ene, euz hon holl nerz. (1)

Karet Doue eo ar vrasa euz an holl vertuzioù : *major autem horum est charitas.* (2)

Red mad eo d'ar galon karet eun dra bennag : *qui non diligit manet in morte.* Ar galon a zo great evit karet evel al laboused da nijal... etc.

Ha petra a garimp-ni, ma ne garomp ket Doue ?

Marteze divuzou (*divertissements*) ar bed-ma ? — A ziabell e

(1) Doue, pa grouaz an den, a goulmaz evit hen ober tri dra dishenvel : 1° eun tamm pri, a reaz hon izili ; 2° eun elven a skiant, a lakeaz spered en hon tal ; 3° eur c'huezaden a garantez tennet a galoun Doue, a roaz buez d'hor c'haloun.

Setu perag : (1° et 2°) spered an den a die kaout feiz hag esperanz ; 3° hag he galoun, karantez.

(2) Red mad eo d'an den kaout feiz, esperanz ha dreist-holl karantez. Evel ar mean alchouez (clef de voûte) a zalc'h ar goareier ploum, ar garantez a zalc'h ar vuez kristen en he zav.

Ha perag karet Doue ? Abalamour Doue eo hor mestr, hon tad, hor madoberour : abalamour ma c'hourc'hemenn deomp he garet ; abalamour m'en deuz karantez evidomp... Eun tad a c'houlenn karantez aberz he grouadur. Penaoz Doue ne rafe ket ?...

Ha perag n'her c'harfemp ket ? Doue zo mad dreist mad...

seblantont beza eun dra benag ; mez a veac'h tanveat, int tremenet :

Evel ar bleunv e lugernont,
Mes evel ar bleunv e c'houenvont.

Marteze ar plijadurezioù fall ? — Ha goudeze ?..., etc. Da-si, duze, bern teil. Ha dont c'hoaz da glask en em dorchha ouz an dud ! Gant ar vez da viana... Da-si kuit ! — An den fall a stlapper pell, evel eul loan divalo.

Marteze an dud all ? — Ha goudeze e vezo guir lavaret : *Donec eris felix...*

Keit ha n'ho po ezom ebed
C'hui gavo kalz a vignouned :
Pa zeu, avad, berrou a vel,
Kalz mignouned a dro banel.

(*Danevel pe histor eun den a re sevel eun ti.* — Ma ! eme lod, strizik mad a rit anezhan. — Ia, re frank 'ta, eme Sokrât : ne gavin ket a vignouned aoualc'h evit her c'harga. — Guir a lavare !)

A hent all, ha kaer a vezo, dindan an heol e holl draou an douar ne gaver nemed avelach ha poan spered : *vanitas, vanitatum...*

Doue ebken a hell ober euruzded ar galoun.

(*Danevel paour al lochenn.* — Keit ha ma hellaz e iezaz da glask he damm ; — kouezet klanv, den var he dro ; — na goulou na tan en he lochenn ; — evit guele, eur vriad raden. — Doaniuz, truezuz eo ho stad ! eme unan benag. — Oh ! n'eo ket, emezhan. — Penaoz, den var ho tro..., etc. — Euruz oun, ne vank netra d'in ; guelloc'h evit tud zo var va zro ; sellit aze : dre an toull en doen, e velan an Env ; sellit ama ; metalen va fask kenta en-dro d'am gouzouk ; hag a-ze : va brasa mignoun. Hag e tiskoueze eur groaz great gant eur c'hlaouen var ar voger..., etc.)

Setu petra ra, er galoun, guir garantez Doue.

Va mab, eme ar Rouanez Venn d'he mab (deuet da veza Sant Louiz), gouzout a rez pegement e da garan ; mez guell e ve ganen da velet maro, eged da velet sammet a eur pec'hed marvel, a unan ebken.

— Loden an nesa —

1° Petra eo karantez an nesa ?

Karet an nesa eo goulenn evithan hag ober dezhan, ervez hor galloud, ar memez mad evel deomp hon-unan.

Red eo karet an nesa (hag hon nesa eo pep den, zoken hon adversourien) : *Diliges proximum tuum sicut teipsum..., Hoc est mandatum meum..., in hoc cognoscent omnes quid discipuli mei estis, si dilectionem habueritis ad invicem.*

An nep a lavar e kar Doue, ha ne gar ket he nesa : *mendax est, et in eo veritas non est.*

Sicut teipsum, da lavaret eo : grit d'ar re-all ar pezh a garfac'h a ve great deoc'h, ha ne rit da zen ar pezh na garfac'h ket a ve great deoc'h hoc'h-unan.

2° Ar renk a dleer miret e kenver an nesa

Karet :

Hon-unan, ervez Doue.

Ar pried.

An tad, ar vamm, ar vugale.

Ar gerent.

Ar vignouned, ar vadoberourien.

Tud hor bro.

An dud estren, — muioc'h ar re vad eged ar re fall.

3° Penaoz diskouez hor c'harantez ?

Evit an ene : pedi ha korrija.

Evit ar c'horf : rei aluzenn. Rei aluzenn zo lakaat var interest etre daouarn Doue..., etc. *Non diligamus verbo, neque lingua, sed opere et veritate... Quod superest, date eleemosynam.*

§ IV. AR RELIJION

Great daou bost ar skeul ; kavet ar vaz kenta. E pelec'h ema ar ienn da starda ?

He c'haout a reomp er Relijion.

1° Petra eo ar Relijion ?

Ar Relijion a zo eur vertuz hag a zoug ac'hanomp da renta da Zoue an enor a dleomp dezhan.

Kaout relijion eo diskouez, a-vel kaer d'an holl, hor feiz, hon esperanz, hor c'harantez ; ar c'hoant hor beuz da veuli, da bedi, da enori Doue.

2° Red eo kaout Relijion

Ar plant savet e kuz, eb heol, eb ear, eb sklerijen an deiz, ne reont ket a vrud.

Setu perag komzou Hor Zalver : Ar re ho devezo bet mez ac'hanon-me dirag an dud, me 'm bezo mez anezho dirag va Zad.

Mad, hirio an deiz, kalz tud a zo diskennet beteg eno. C'hoant ho defe da vev e guir gristenien, ha ne gredont ket hen ober : aoun ho deuz rag an dud fall. (1)

Va B. k., me gred eo eun dizenor beza laer, beza muntrer, beza den lik..., etc. Beteg-hen ne zounjiz ket e tliet kaout mez d'en em ziskouez tud vad, tud leal, tud pur, tud honest.

Mad, va B., tostaat a ra an devez ma ranko pep hini en em ziskouez evit ar pezh ma 'z eo. Kaout kroc'hen kristenien ebken ne dalvezaz morse kalz a dra : red eo kaout eur spered kristen, eur galoun gristen. — Red eo : beza kristen penn, kil ha troad. (2)

Klask a rear distruja ar relijion en hon touez. Sonjit mad en eun dra : Doue n'en deuz ezoum ebed ac'hanomp-ni ; ni avad hor beuz holl ezoum euz an Aotrou Doue.

3° Ar Relijion, ouspenn ma ra deomp enori Doue hag he garet, a c'houlenn c'hoaz ma vo enoret ar Verc'hez sakr ; ar zent ; hor zant patron ; patron hor parrez hag hor chapelioù ; patron an Eskobti ; an eal-mad.

Goulen a ra ouspenn : respeti relegou ar zent, ar groaz san-

(1) Stank eo ive ar re a glask digareziou.

1° M'em euz ar relijion a blij d'in !! — Nan, red eo kaout ar relijion a blij da Zoue, hor Mestr.

2° Aoulc'h eo beza den honest ! — Ia, evit miret ne zafec'h d'ar galiou ; mez etre ar galiou hag ar baradoz ez euz hent hiri : kement ne ieont ket d'ar prizoù ne ieont ket d'ar baradoz..., etc.

3° Ar relijion, da betra eo mad ? — da bep tra ha da bep hini. D'ar paour, evit..., etc. ; d'ar pinvidig ; d'ar pried ; d'ar vistri ; d'ar zervicherien ; d'an dud a zo e karg ; d'an dud euz, evit ma veulint Doue ; d'an dud ankeniet, evit ma ne zizesperint ket.

(Guez ar vamm o lenva d'he merc'h nevez maro).

(2) Poltred eun den a relijion.

— Roud penn he c'hlin el leur-zi, rag ma ped mintin ha noz (buez ar zent..., etc.).

— Sin ar groaz var he dal, araog ha goude ar pred.

— Eur vech dre 'n amzer, he zaoulagad savet, varzu an Env, epad he labour.

Bep tri, bep daou, bep miz avechou, var he zaoulin e kichen ar gador govez hag ouz an daol zakr.

— Bep sul, bep gouel berz, he blaz en iliz.

J. Q.

tel, an imachou, an dour benniget, ar vered, ar beziou, eskern an dud varo, etc.

4° Eur ger, mar karer, divar-benn ar superstisionou : div-nourien, sorserien... Pa lezer a gostez relijion Doue, a gemerer relijion an diaoul. Be' zo lod hag ho deuz poan o kredi an holl guirioneziou, hag ho deuz feiz e oberou ar re a labour en hano pe dre finesa an droug-spered !...

EIL GOURC'HEMENN DOUE

Non assumes nomen Dei tui in vanum

Heb kaoz he hano na doui ket
Nag ive netra all ebed.

Red eo respeti hano Doue.

1° Doue a zo santel.

2° He hano a zo sakr.

3° Doue a c'houlenn respeti he hano.

Eur protestant, den gouizieg meurbed (Newton), a zizoloe he benn pa gleve lavaret hano Doue.

Er baradoz, an elez hag ar zent a lavar bepred : *Sanctus, sanctus, sanctus*... Eveldho ni dle ive meuli Doue hag he hano.

— E teir zoare e pec'her a eneb an eil gourc'henn.

1° E toui heb abeg.

2° E vlasfemi.

3° Ec'h ober goall bedennou.

1°. — An Touerez

Petra eo toui ?

Toui a zo kemeret Doue pe eun dra benag all da dest eo guir ar peza leverer.

Evit toui ne ket aoualc'h lavaret komzou hag a zeblant, dreizho ho-unan, beza eun douaden. Red eo kaout *sounj*, *c'hoant*, *intansion* da doui. — Setu perag : *feiz eo... guir pater*... n'int ket touadennoù. Setu perag c'hoaz : *sakreal, tonnerdeal* n'eo ket ken nebeut toui, peurliesha da viana. Lavaret *braz komzou, komzou groz*, ken nebeut all. (1)

(1) Ar zakreou, ar malloziou : g..., t..., etc., daoust n'int ket touadennoù, a zo koulskoude komzou fall, komzou an ifern. Eno ar seurt komzou-ze a zere dloc'h an dud zo ebarz ; mez nan etouez ar gristenien.

Dirag ar barner ne ket difennet toui. A hent all eo pec'hed, zoken pa douer ervez ar virionez, mez heb abeg.

Lavarit : *ia, ia ; nan, nan*. Evit eun den honest, kementse a zo aoualc'h. — Nag a bet koulskoude a zo atao prest da doui.

Ar fals leou-douet.

Eul le faoz a rear pa douer, gant gouiziegezh vad, a eneb ar virionez. — Eur pec'hed marvel eo. Doue ne fell ket dezhan beza kemeret evit rei golo d'ar gevier.

(*Danevel an tri berad goad e Kemper*. Eun den en doa prestet arc'hant da eun all. Heman a nac'h. Galvet da zevel he zourn dirag ar Groaz, va den a laka an arc'hant en eur vaz toull, hag epad ma tou, e ro ar vaz da zerc'hel d'an den all... Tri berad goad a strinkaz a gorf Hor Zalver. — Gouel an tri berad goad-se...)

2°. — Blasfemi

Blasfemi a zo lavaret eur gomz a zismeganz a eneb Doue, ar zent pe an traou sakr. — A eneb, da lavaret eo : tenna digantho eur vertuz bennag. (Doue n'e ket just...); tamal dezho eun tech fall bennag. (Ar zent a zo tud diskiant...; ar zakramanchou a zo ravoderezh, ha netra ken...)

Blasfemi a zo ober eur goall bec'hed ; avechou zoken unan euz ar re vrasa, evel ma ve rei, dre gasoni, malloz da hano Doue.

Aliez, er bed-ma zoken, Doue a sko ar re a zeu da vlasfemi.

(*Danevel pe histor eur mevel e M...* Epad ma strake ar gurun, an den a dennaz he gorn-butun... Ro d'in eun tammik tan da dana va c'horn... Ar gurun a gouezaz varnha raktal..., he groc'hen skiriennet... ; maro spoutuz).

(*Histor all*. Eur penturer a oa o live eur zant, hag ar zant-ma a oa great he c'hinou eun tamm a-dreuz. En eur eva eur banne, ar penturer a lavar : ac'hanta, beg-treuz, n'ec'h euz-te ket c'hoant da drinka ? A veac'h he gomz achuet, he c'hinou he-unan a zo eat a-dreuz glez).

Kleout a rear avechou komzou, hag a zeblant beza dismegansuz, ha n'ho deuz e guirionez drougiezh fall ebed.

(*Histor martolod Sant-M...* — Edot o pokat d'ar relegou. Ar martolod, eleac'h pokat d'ar relegou, a bok d'an ezansouer a oa tan ebarz. Kerkent e lavar : « Set' ama eur zant daonet avad hag a zo tomm he relegou ! »)

3°. — Droug pedi

Droug-pedi a zo goulén ma tigouezo eun droug benag ganeomp hon-unan, gant tud pe draou all.

Red eo goulén mad an holl ; difennet eo goulén droug da zen.

N'eo ket red evelkent goulén kement ha kement mad an eil hag egile : ni hag hon tud, da genta ; ar re vad, goudeze ; ar re fall, varlerc'h.

Arabad eo dezirout droug da zen. Mar deo ar beden vad nerzuz evit ar mad, an droug-peden a helfe beza nerzuz evit an droug.

Ha koulskoude an droug-pedennou a zo stank. (Daonet ra vo ma ene... me garfe da velet maro... Kea gant an diaoul..., etc.)

TREDE GOURC'HEMENN DOUE

Memento ut diem sabatti sanctifices

Miret a ri an holl zuliou
Gant œvrou mad ha pedennou.

Pa grouaz ar bed, Doue a heanaz ar seizved devez : goulén a ra ma raimp evel d'han.

Var seiz devez, c'hueac'h a lez ganeomp evit traou an douar, evit mad ar c'horf : ar seizved a zalc'h evithan he-unan hag evit mad hon ene.

An devez-se eo devez an *Aotrou Doue* ha devez an *ene*.

PETRA DA OBER EVIT TREMEN AR ZUL ERVEZ DOUE ?

Evit sanctifia ar zul, eo red dreist-holl :

1° Lezel al labour-gorf a gostez.

2° Kleout an oferen.

1° Ha da genta, RED EO DILEZEL AL LABOUR-GORF. — Diskouez aman ez euz tri seurt labour : labour-spered ; labour-gorf ; labour etre-daou.

Al labour-spered eo an hini m'en deuz ennhan ar spered muioc'h a berg eged ar c'horf.

Al labour-gorf eo an hini m'en deuz ennhan ar c'horf muioc'h a berz eged ar spered.

Al labour etre-daou eo an hini a zalc'h evel kement ha kement euz an eil hag euz egile : pesketa, chaseal, c'hoari..., etc.

Al labour-spered n'eo ket difennet.

Al labour etre-daou a zo gueach difennet ha gueach n'eo ket. — Pa 'z ear da besketa, evit en em zivuzi, netra ken, neuze n'eo ket difennet..., etc. — Pa rear eur vicher euz ar besketerezh, neuze eo kentoc'h eul labour-gorf eged eul labour-spered..., etc.

Al labour-gorf a zo *difennet* : difennet eo labourat an unan ; labourat gant he alar... ; lakât labourat.

Al labour-gorf a zo *didalvoud* : ar pezh a c'hounit marc'h paolik a ia d'he houarna, ha c'hoaz e chomm atao eur pao dizhouarn. — Bleud an diaoul a ia holl da vrenn, hag ar brenn da netra.

Digareziou

— Me a rank dibri da zul !

Debrit, evit, deuit lard, hag e varvot lard ; ha goude-ze, friko da gountroun (da brenved) an arched..., etc. — Mez an ene a c'houlenn ive dibri eun dra benag ; roit eun tam magadurez d'an ene : *non in solo pane vivit homo...*, etc.

— N'eo ket e tidalvezi (e chom dilabour) en em vagin, e vagin greg ha bugale !

Guir eo ! mez n'eo ket gant ho poan hoc'h-unan, ken nebeut. — Da heul dourn an den eo red dourn Doue, red bennoz Doue : *Deus autem incrementum dedit*. — Ar gliz, ar glao, an heol, an avelou-suil, ar c'hazarc'h : holl emaint e dourn Doue. — Ouspenn a zo : ar c'hlenved hag ar iec'hed a zo ive var balf he zourn..., etc. Nag a bêta lavare : kement-ma great eo atao ! hag antronoz oant var ho guele (er boan, dilabour, dispign medisin, dispign remejou...)

— Guelloc'h eo labourat eged na deo mont d'en em vezvi.

Sur aoualc'h. Ker sur all avad : eo guelloc'h terri he viz eged he vreach, guelloc'h terri he vreach eged terri he benn. — Ar guella zo eo : na terri na biz, na breac'h, na penn. — Evelse guella zo : eo chom heb labourat, hag heb beza mezo !

— Me a labour e kuz !

E kuz ouz lagad an dud... ; mez nan e kuz ouz lagad Doue. O labourat e kuz, ne rit ket skouer fall ; mez pec'hed oc'h euz oc'h ober labour difennet. Eleac'h daou bec'hed, ne rit nemed unan.

— Me a labour evit ar paour !

Ha mar teufe ho mevel d'ho laeret evit, en despet hag heb gouzout dare deoc'h, ober aluzen d'ar paour, petra lavarfaç'h ? C'hui ive a laer an Aotrou Doue, evit ober, en he hano, aluzen en despet dezhan..., etc.

— Me ne ran nemed dister dra ; eun distroad benag, troada benviachou..., etc.

Histor an hini, kaset da gerc'hat bara poaz d'an ti fourn, a binse an dorz... — Piou en deuz great an toull logodenn-ma?... , etc.

Diskouez penaoz hag evit petra e teu al labour-sul da veza dibec'h. — N'eo ket pec'hed ober ar pez zo red : aoza boued, ober eun arched, toulla eur bez. — N'eo ket pec'hed labourat evit pellaat eur c'holl braz, evel : mouda an tan-goall, savetei an eost..., etc.

Ali mad. — 1° Evit afferiou ar bed, e klasker eun alvokad. Evit afferiou an ene, klaskit ive eun alvokad, goulennit kuzul digant ho peleien. Pa lavar ar beleg deoc'h labourat, al labour great a zo en he gount.

2° D'an eil, RED EO KLEOUT AN OFEREN. — E pep sizun, eun devez... etc. ; e pep parrez, eun ti dreist an tiez all : ti a beden, ti a c'hrasou, ti Doue.

Red eo kaout oferen. — Mankout, dre ar faot, a zo pec'hed marvel. — Ouspenn-ze, izom braz hor beuz d'en em glevet gant Doue. — Er zizun dremenet, nag a bec'hejou marteze ; red eo goulenn nerz..., etc. — En oferen, trugarez... ; en oferen, grasou... : *in ea qui petit accipit.*

Digareziou

— Louz an hent !

Pa vez foar, pardoun... ez iit, daoust d'ar pri ha da vouillen.

— N'oun ket iac'h aoualc'h !

Hag emaoç'h bemdez o labourat er park !

— An iliz zo pell !

Ar foar, ar marc'had, ar friko zo ker pell all, ha kouls-koude..., etc. — Eur c'hlaoustre (eur bariaden) : eleac'h dour benniget, aour er pinsin ; eleac'h bara benniget, fest ha danz evit an holl, hag evit netra... : den ne vankefe !

Evit petra e heller mankout d'an oferen

Pa vezer klanv. — Pa na gaver ket tro da vont, evel eur martolod var ar mor. — Pa vez eul labour red, evel soursial euz eun den klanv. — Pa vez eun diezamant re vraz, evel pa vezer koz-koç, mac'hagnet..., etc.

Penaoz kleout an oferen

Penn-da-benn. Eun hanter devez labour n'eo ket eun devez labour : eun hanter oferen n'eo ket eun oferen. — Evelse : adaleg an aviel beteg ar fin ; hag adaleg ar penn kenta beteg goude ar gommunion.

Gant evez. Red eo digas ar spered hag ar galoun da heul ar c'horf. Anez an oferen a dalv nebeut a dra (an taok dindan ar gazel... ; ar biz-iod... ; ar chapelet krouget).

Kleout oferen ar barrez. Hor barrez eo hon ti ; oferen ar barrez, hon oferen ; prezegen ar barrez, hor prezegen.

Kleout an oferen-bred. — Hieo ar guella ; ennhi aliou mad ; ennhi ar muia grasou..., etc.

Diouall da ober skouer fall en oferen. Guelloc'h eo chomm er meaz..., eged kaozcal, sellet, c'hoarzin..., etc. Diouall da jomm var benn eur c'hlin..., etc. — *Domus mea domus orationis est, et non spelunca latronum.*

Petra zo c'hoaz mad evit santifia ar zul ?

Penaoz benag n'eo ket kement-ma red, eo mad evit santifia ar zul : ober oberou a zrugarez ; kleout ar gousperou ; mont d'ar prezegennoù ; ober eur beden benag er gear pa vezer bet en oferen vintin, evel lavaret ar rozera, lenn an aviel..., etc.

(Histor ar c'histin poaz — pe eun all.)

Red eo pellaat diouz ar pec'hed. Ar pec'hed zo atao pec'hed ; mez ar pec'hed da zul a zo brasoc'h : dismeganz a ra da Zoue. — Be' zo lod hag a zo tud vad var ar zizun ha diaoulou da zul (mezventiou, en em gannou..., etc.)

PEVARE GOURC'HEMENN DOUE

Honora patrem tuum et matrem tuam ut sis longævus

Da dad, da vamm a henori
Ha da vuez a astenni.

§ I. — Deveriou ar vugale e kenver tad ha mamm

Beteg-hen, hor beuz komzet a Zoue ebken; mez enn-dro deomp ez euz tud-all krouet evelomp gant Doue, evelomp bugale da Zoue. En ho c'henver hon deuz deveriou, dreis-holl e kenver ar re anezho a zo lakeat da dosta d'hor c'haloun.

Da dad, da vamm a henori....

Petra a zoug ar gourc'hemenn-ma?

Pevar dra a zoug :

- 1° Karet an tad hag ar vamm ;
- 2° Ho respeti ;
- 3° Senti outho ;
- 4° Ho zikour enn ho ezommou ken a gorf, ken a ene.

1° — Karet tad ha mamm

Eun dra estounuz eo en defe Doue great ar gourc'hemenn-ma. Seblantout a ra e ve awalc'h, evit ho c'haret, taoler hon dourn var hor c'haloun, ha sounjal er garantez ho deuz bet, hag ho deuz c'hoaz evit ho bugale....., etc.

Koulzgoude pa zeller piz e veler : lod bugale hag *ho deuz kaz outho* ; lod all ha ne fell ket dezho beva gantho ; lod all c'hoaz hag a garfe ho gueleet maro.

(HISTOR. — Er Chin, eun tad a oe barnet d'ar maro. He vab a c'houlenn digant an impalaer mervel e leac'h he dad. An impalaer a ra dezhan buez he dad, hag ouspenn a ginnig dezhan eun hano nobl. — Buez va zad, ia ; eun hano nobl, nan : digas a rafe d'in sounj a vankou va zad).

2° — Ho respeti

Derc'hel a reont e kenver ho bugale leac'h an Aotrou Doue. Koulzgoude : lod *ho disprij* ; lod *a ra goap anezho* ; lod all c'hoaz *a vrud ho mankou*.

(HISTOR. — Eur vreg koz-köz, guisket fall, o vont, harpet var he baz, gant an hent varzu an iliz. Eun den iaouank, he dog nevez var gorn he benn, he c'houriz, etc..., a zeu ive gant eur c'hamarad. O tremen dirag ar vaouez koz, an den iaouank a dro he benn : disprij en deuz evit he vamm).

(HISTOR ALL. — Eur barz a reseve eur gurunen a henor... ; an holl a strake ho daouarn. Eun den koz divar ar meaz, guenn he vleo, a dostaaz, an daélou en he zaoulagad, ha digor he zivrec'h. Ar barz a reaz ar van d'hen dianaout ; kerkent eo disprijet : he dad eo an den koz-se, hag an holl a ra hu var ar c'hrouadur digalon).

Histor Noe, surprenet gant an evach, etc.

3° — Senti outho

E peb tra eo red kaout eur penn :

Ar vag ne zent ket ouz ar stur
Ouz ar garrek a ra sur.

Ar stur eo an tad, ar vamm. Koulzgoude : lod bugale *a ra ho mistri* ; lod all *ne zentont nemed en despet dezho, var hanter, en eur c'hrozmolat*.

Red eo senti : *prim* ; — *hed-da-hed* ; — *a galoun-vad*. — Evelato, mar teufe tad ha mamm da c'houlenn eun dra benag a eneb Doue, e ve red dizenti. Ar c'henta tad eo Doue, ha kentoc'h e tleer senti ouz Doue eged ouz an dud.

4° — Ho zikour

Ha da genta, *sikour ho ene*. Mar d-eo mad tad ha mamm, pedi evit ma kendalc'hint. Mar d-int fall, pedi evit ma tistoint. Var ho zremenven, taoler evez ha kemeret poan evit m'ho devezo ho Zakramanchou diveza. Pa vezint maro, daoulina var ho bez ; pedi evitho e korn an oaled ; lakat pedi, etc.

D'an eil, *ho zikoure ezommou ho c'horf*. Ho guiska ; ho maga en ho c'hozni. (Roi d'ezho an tamm dillad tomma, an tamm bara guella). Kaout anezho soursi en ho c'hlenved. Diouall da rebech dezho an dispign a zo gantho : eur rebech a zo ato c'houero, c'houero dreist-holl aberz bugale.

(HISTOR. — Eur vamm e doa tri mab. Ar vamm a oa paour. An tri mab a denn d'ar zort, evit gouzout pehini a dremenje evit eul laer braz a reat, d'ar mare-ze, enklask anezhan... etc.).

Ar re a ra ho dever e kenver ho zad hag ho mamm a zo bugale vad : ar vugale vad a vez benniget gant Doue ha gant

an dud. Ar re ne reont ket ho dever a zo bugale fall : ar vugale fall a denn varnho malloz Doue ha disprijanz an dud.

(HISTOR. — Eur mab a dreine he dad beteg an treujou divar-bouez he vleog guenn.... Arz ama, eme an tad ; d'an oad ec'h euz n'em boa ket treinet va zad pelloc'h, etc.)

(HISTOR ALL. — Eur mab a ganne he dad gant eur vaz. He vab he-unan a oa o sellat.

— Sell, paotr, eme an tad, taol ar vaz-ma en tan : great e deuz he labour.... Ar bugel a zell outhi ; he zro, he distro.... eb senti. — Ac'hanta ! ha n'em euz ket lavaret taoler ar vaz en tan ; da betra chomm aze da dorta ? — Souñj em boa, eme ar mab iacouank, da viret ar vaz-ma, d'ho kanna, d'am zro, pa vezin braz..., etc.).

§ II. — Deveriou peb kristen e kenver an dud a iliz

C'houl a lavaro, a lavar marteze dija e pleg ho kaloun : *ar manac'h a barlant evit he zac'h* ! etc. Nan, evidoc'h ha nan evidomp eo ez an da barlant.

Ar beleg en deuz ezomm euz an holl, ha n'en deuz ezomm a zen. Ezomm en deuz euz an holl, rag evit an holl eo beleg.... Ezomm a zen : « *Pa n'ho selaouint ket, eme Jezuz-Krist, gñit eun heja d'ho poutou da zistaga ar boultren, ha kit kuit, etc.*

Petra a c'hell eur c'hristen evit gounit an Env eb ar veleien : Koulz lavarct netra : « *Vade ad Ananiam...* »)

Setu perag eo red da bep kristen : *Kredi, respeti* ha *karet*. ar *Pab* : ar Pab eo penn an iliz ; Vikel Jezuz-Krist var an douar ; rener ar gristenien.

Red eo ive : *Kredi, respeti* ha *karet* an AOTROU 'N ESKOB : hen eo Tad spirituel an Eskobti.

Red eo c'hoaz : *Kredi, respeti* ha *karet* BELEIEN AR BARREZ. Ho c'hredi : « *Qui vos audit me audit* » ; ho c'homzou a zo komzou Jezuz-Krist. Ho respeti (1) : « *Qui vos spernit me*

(1) Hist' an Aotrou marc'hadour moc'h. — Eun den divar ar meaz a gonte deur c'hamarad en doa leinet e ti an Aotrou marc'hadour moc'h, ha koaniet e ti ar Person !

Hist' ar Berre hag ar Bras. — En eur barrez e oa person an Aotrou Berre, hag an Aotrou Bras e oa kure. Eun den a levere : gueleit em euz ar Berre hag ar Bras o vont d'ar pardon. Respontet e oa dezhan : lavar « Aotrou » 'ta ; rag ar Berre a zo re verr, hag ar Bras ne ket braz aoualc'h.

J. Q.

spernit » ; an dismeganz a daoler varnho a ia beteg Doue. Ho c'haret : evit ho farrisioniz e tilezont ho c'herent, ti ho zad.... Ne c'houlennont nemed karet ho farrisioniz ; ho c'haret a reont ato, zoken pa renkont ho gourdrouz....

Eun dever eo renta dezho karantez evit karantez, rag :

Kemeret eb morse rei
A lak ar galoun da drei.

(HISTOR AR C'HI GARD. — Eun den a levere d'he amezega petra rez e vaga ar c'holl-bara-ma ? laz da gi, nebeutoc'h : zispign ez pezo.... An amezeg a zentaz. Mez siouaz ! Eur vech lazet ar c'hi, an derved a ie gant ar bleiz, ar ier gant al louarn, an arc'hant gant al laer !!! Ar c'hi a vanke da zifen peadra he vestr.... Kleout a rer avechou tud o lavaret : d'ober petra eo mad beleien ?.... Ma ne ve beleg ebed mui e velfe an dud petra eo c'hoarvefe : ar bed-man e ve eun ifern !)

§ III. — Deveriou tad ha mamm e kenver ho bugale

Tad ha mamm, aliez, en em glemm euz ho bugale. Bugale, aliez all, en em glemm euz ho zad, euz ho mamm ? E pe du ema ar brasa mank ? Douetuz braz zo mank en daou du. Peurvuia evelato, ar brasa mank zo gant an tad hag ar vamm. Mar d-codiroll ar vugale, piou zo kaoz ? An tad hag ar vamm ; rag ar vugale a vez ar pez ma vezont great. Nebeut a dreac'h gouenn : lod her gra ; mes rouez awoualc'h int, etc.

Guelomp eta petra a dle tad ha mamm da ober, evit diorren (sevel) mad ho bugale.

Daou seurt deveriou ho deuz da ober :

1° Deveriou e kenver ar c'horf ;

2° Deveriou e kenver an ene.

Evit ar c'horf

A. Kenta dever. Arabad, dre an izign an-unan, sevel eur speuren evit diarbenn ar vuez (1).

(1) Eun devez e c'houlennet digant eun tad hag eur vamm gristen pet ho doa a vugale. Hag hi respount : hini ebed a re, nag hini ebed a re nebeut. Hini ebed a re : pa deu eur c'hrouadur e vez digemeret ha diorrenet mad. Hini ebed a re nebeut : beva a reomp. evel priedou kristen, ha kemer a reomp a greiz-kaloun ar vugale a blij gant Doue da rei deomp....

Tadou ha mammou, eun devez Doue a rai deoc'h ar memez goulenn ! Euruz neuze ar re a c'hell respount : hini ebed a re ; hini ebed a re nebeut.

J. Q.

E c'haller chomm eb dimizi. . . . E c'haller, goude beza demezet beva, *avechou*, evel breur ha c'hoar. . . . Pa vever evel priejou, e ranker beva evel priejou kristen.

B. *Eil dever*. Kerkent ha ma vez ar vamm dougerez, a rank taoler evez mad ma teuo ar c'hrouadur a zoug da velet sklerijen an deiz, etc.

C. *Trede dever*. Eur vech ar c'hrouadur ganet, pellaat peb danjer divar he dro; arabad araok bloaz ha devez, hen lakaat da gouskat er guele braz, kostez ha kostez gant tad ha mamm.

(Histor ar vamm e doa mouget he c'hrouadur bian, eb gouzout dare dezhi. . . . An dra-ma zo bet c'hoarvezet ouspenn eur vech).

D. *Pevare dever*. Poania da lezel, e peb honestiz, eun tamm peadra gant ar vugale. Diez eo evit tad ha mamm, ken diez eo evit ar vugale rankout mont a zor da zor. . . .

E. *Pemped dever*. Ho guiska, ho maga, ho deski ervez ho stad, ervez ar galloud, ervez ar renk.

Guelloc'h deski mabik bian
Eged dastum madou dezhan.

F. *C'huec'hved dever*. Ho lezel ha heulia an hent merket gant Doue. Mar goulennont mont da veleien, da zeurezed: ho lezit-hi. Mar goulennont dimizi: ho lezit-hi ivez; mez poanit da ober dezho entent mad eo:

Guelloc'h furnez
Eged danvez.

Arabad ober fae var an arc'hant; eun dra vad eo, pa rear implij mad anezhan. (1)

Danvez ha furnez dourn-ha-dourn a zo bara guiniz amanennet dioc'h an daou du. Dibaot a vech en em heuliont. . . . E kenver choaz, choazit furnez: lod tud a zo re ger gant ho danvez; lod all, en despet d'ho faourentez, ne vezint morse paet ker awalc'h.

(1) Pa c'heller miret, arabad lakaat daou zen iaouank da vont da

Frita laouen ar baourentez
Var billig kraz ar garantez.

Pe velloc'h:

Frita laouen ar garantez
Var billig kraz ar baourentez.

J. Q.

ALI A BRIZ BRAZ

Eur vech dimezet ar vugale, peurvuia e teu dezho lignez. Neuze e klaskont lakaat ar re goz da rei ho dilez. Tadou, mammou, karit mad ho pugale; mez *dalc'hit stard d'an askourn braz, ha kig outhan. . . . beteg ar maro*. Rei an danvez d'ar vugale zo hada keuz e penn an ti, hag avechou keuz re zivezad.

(HISTOR EUN DILEZ. — Eun tad a oa bet gread al lazik dezhan kement gant he verc'h-kaer, ma roaz he zilez. *Araog*, e veze lavaret dezhan: n'ho pezo netra da ober, netra ne vanko deoc'h. . . . *Goudeze*: allo, bonhom, savit buan, iit d'ar park. . . .

Eun devez, en eur vont d'an oferen e kavaz he vignon.

— Asa, Per, abredig emamp.

— N'emaoun ket re abred; kalz traou em euz da lavaret d'an Aotrou Doue. . . ., etc.

— Selaou, Per, eur bod-spern zo en da dâl!

— N'euz ket; em c'haloun avad ne lavaran ket! Selaou petra zo c'hoarvezet. . . .: hag hen displega he vuez abaoue an dilez.

— Per, emezhan, deuz du-ma d'ez lein.

— Mont a riin.

Goude lein, ar mignon ez a d'he armel:

— Sell, Per, kas ar c'hant skoued-ma ganez.

— Jekon, Iann, ne meuz diner na netra var va hano; nan kleo: koll a rafez da arc'hant.

— Ne gollint ket. Sad' ama, petra eo: te gounto ar re-man epad eun tri pe bevar devez, a rai kalz trouz gantho, evit ma klevo da verc'h-kaer trouz an arc'hant.

— Ha goude?

— Goude, te zigaso va arc'hant d'in. . .; te velo en em gavi mad.

Hag e guirionez, o sounjal en devoa dalc'het ganthan eun tamm brao a arc'hant, ar verc'h-kaer a jenchaz tu d'he zeod: tad ac'hann, tad alec'hont. . . . (friko d'an tad, netra da ober. . . .)

(HISTOR ALL. — Eun tad a oa eat gant he vab-kaer da di an noter. Great ganthan he zilez, distro d'ar gear, an tad a ia, ervez he gustum, er penn huella euz an daol.

— Hopala! eme ar mab-kaer, henez eo va flaz-me: breman me ar mestr.

Hag an tad, eb koan, e korn an oaled, en he blaz a ziagent.

— Tec'hit kuit, eme adarre ar mab-kaer, hounnez eo skabel ar mestr.

Hag an tad d'he vele.

— Nan aze : guele ar mestr eo hennez ; e lost an ti ema ho plaz.

Hag an tad, eb gouzout da zen, dao da di an noter, freuza an affer, ha dont d'he vele.

Antronoz, ar mab-kaer :

— Allo, er meaz, ha buan.

— Poan-benn em euz.

— Savit, pe n'ho pezo tamm dijuni.

— Oh ! eo emechanz . . .

Hag hen sevel, ha diskuez ar paper freuzet.

Diouall eta da zispega re abred. Guelloc'h eo d'ar vugale astenn ho dourn da c'houlén digant ho zad, eged d'an tad astenn an dourn da c'houlén digant he vugale.

A hent all, great an dilez, eo diez da eun tad kas he vugale dirag ar barner, evit kaout ar pezh en deuz divizet.

Feit an ene

A. *Kenta dever*. Roi, kenta ma c'heller, ar vadiziant d'ar c'hrouadur : ar vadiziant eo alc'houez an Env.

B. *Eil dever*. Deski dezhan, abred, anaout, karout, douja, pedi Doue. Ar beden desket var barlenn ar vamm a jomm skrivet er galoun.

E meur a leac'h, en eur lakaat eur bugelik bian en he gavel, e rear sin ar groaz varnhan gant he zournik bian, ha goude-ze e leverer : en hano Jezuz ha Mari, bezit-hui eun nozvez vad ha iec'hed mar plij gant Doue.

En eur viska dezhan he grez, hen lakaat da boket d'ar c'hrez-se evel ma pok ar paour d'an aluzen a roer dezhan, en eul lavaret : en hano Jezuz ha Mari, bezit-hui eur zizunvez vad ha iec'hed mar plij gant Doue.

C. *Trede dever*. Deski hag ober deski dezho katekiz : ar guir skiant a zo eno :

Guelloc'h kelen mabik bian
Eged dastum madou dezhan ;
Mez skiant an holl skianchou
Eo deski mad hent an-Envou.

Pa c'heller, ho c'has da eur skol gristen. Eun den, en eur vont er meaz euz a eur gear kemeret gant tud a vrezel, ne gase

ganthan nemed he vaz, en eur lavaret *omnia mecum porto* : kas a rea ganthan he zeskadurez. An deskadurez vad eo, goude doujanz Doue, brasa tenzor an den.

D. *Pevare dever*. Ho fellaat dioc'h ar goall gompagnuneziou . . . Lavarit d'in da heul piou ez ijt, ha me a lavaro deoc'h piou oc'h.

(HISTOR AN DANVAD GALUZ . . . ; an aval brein . . . ; al loaiad leaz trenk en eur bodezad leaz dous . . . , etc.)

Ar gerent a dle eta ober d'ho bugale dont abred d'ar gear, evit ho diouall diouz droug.

(HISTOR C'HOARI MOUCHIK DALL. — En eun ambludadeg-noz, unan en eur voucha eur plac'h iaouank a zuaz dezhi he diou chod. Abarz pell ar botred iaouank a oa eno ho doa holl duad ouz ho chotou.)

E. *Pemped dever*. Ho c'horrija pa vankont. — Asa, Per, penaoz a rit-hu evit kaout bugale ker fur all ? — Evel an Aotrou Doue : Doue a ginnig baradoz pe ifern ; me ive em euz eur pok hag eun taol-baz evit ar bugel diuj :

Eur bugel zo red he vaga ;
Ken red all eo he gorrija.

Red eo korrija *abred : principiis obsta, sero medicina paratur* . . . , etc. Eur blanten iaouank a zo eaz da zigamma ; eur blanten goz a dorfe kentoc'h eged eouna . . .

Red eo korrija *na re, na re nebeut : suaviter et fortiter*. *Suaviter* : an horz a zo great evit pilat lann ha nan daskei var chouk eur bugel. *Fortiter* : eur pok zo mad da zec'ha daélou ; evit tenna eun dren eo red beg eur spillen. *Suaviter* : eur baz koat a gign kein ar marc'h. *Fortiter* : eur baz stoup a bleg hag a uz. Red eo kaout eur baz etre daou : eur baz koat, stoup dindan-hi, evit ne gigno na ne vlounso, na ne blego.

Red eo korrija var *ar pouez* :

Taoliou roet gant buanegez
A lez're a vlounsadurez.

(HISTOR AN DIBOULTRENNER. — Eun den a gostez Kastel a groge en he ziboultrenner, d'ar zadorn da noz pa veze eat he vugale da gouskat. An diboultrenner-ze a oa eur skourjez great gant pemp touchen, hag a veze, epad ar zizun, stag e kichen eur japeled ouz post guél an tad.

Bugale an ti hen anaveze mad, hag aliez pa vanke unan, ar re-all a ziskueze dezhan gant ho biz an diboultrenner didruez.

An tad ne skandale dibot a vech ; aliez zoken ne rea ket ar van da velet ; mez a gorn e vele peb tra.

D'ar zadorn, en eur ober tro an ti, e levere : Hêp ! deuz ama Perik Sada ama eur c'hrez fresk a-ben varc'hoaz da vont d'an oferen ; evit ne vezo ket louzet dioc'htu, greomp da genta eun tamm kouez : en deiz ma en-deiz, er park ma'r park, etc. ; *ha flip ha flap* . . . kiit brema d'ho klud

Red eo diskuez dezho eo evit ho *brasa mad* eo e korrijer anezho ; rei dezho da entent ma ne vent ket korrijet gant ho zad, e vent divezatoc'h korrijet startoc'h gant Doue.

F. *C'huec'hved dever*. Ho c'haret oll, kement ha kement, da viana mar d'int ker fur ha ker fur :

Aliez ho pugel re voumoun
A zigaso deoc'h rann galoun.

G. *Seizved dever*. Dreist peb tra, rei dezho skouer-vad. Nerzusoc'h eo skouer-vad eged na d-eo ar c'homzou mad :

Komzou mad zo mad :
Skouer-vad zo guelloc'h.
Lagad ar mestr a lard ar march
Hag a ro greun, bâr an arch.

Ne leveromp ket : kiit d'ar park ; leveromp : deomp d'ar park.

(Histor eur bourc'hiz eat da labourat-douar).

Evel-se ive, ne livirit ket : kiit da govez, kiit d'an oferen, livirit ho pater ; mez kentoc'h : lavaromp hor pater, deomp da govez, deomp d'an oferen.

HISTOR JOB AR BRAZ. — Holla, Job, sada ni avad eat da baotr iaouank hirio ; pebeuz jupen lugernuz !

— Sul ar Rozera 'zo.

— Mez perak eo korvigellet korn ho chupen ?

— Ne velit ket ! hema, ar mous-ma, a zo penn-kaoz ; pa 'z aan d'an iliz ema atao krog e korn va chupen.

— Mad, mad da vella Job ; n'euz bouton ebed ouz ho chupen hag a dalve an droidel-ze.

Euruz e vec'h, tadou, ma ve troet evelse korn ho chupen. Euruz e vec'h, mammou, ma ve korvigellet korn ho tavancher gant dorn ho merc'h vian, o vont d'an oferen).

Evelse, evit diorren mad ar vugale :

A. Badiziant dioc'htu.

B. Kelennadurez kristen.

C. Katekiz.

D. Evez mad.

E. An diboultrenner.

F. Karantez guirion.

G. Skouer-vad.

H. Aliou mad he pedennou.

Leveromp evit achui :

BUGALE VAD a zo henor ho zud er bed-ma (histor mamm ar Graked, e Roum) ; ho c'hurunen, er bed-all. (Histor Santez Monika. He dourn e dourn Augustin, he mab, lavaret a rea eun deiz : brema e c'hallan mervel ; roet em boa d'id buez ar c'horf, roet em euz d'id buez an ene ; great va labour . . .)

Eur vamm all a oa o vont da vervel. An holl a vouele en dro dezhi. Neuze ar vamm a lavaraz : lod euz va bugale a zo dija er baradoz ; mall em euz da vont d'ho c'haout. C'hui a jomo var va lerc'h ; mez desket em euz deoc'h an hent ; dalc'hit mad ; en em velet a raimp ; da c'hortoz me a bedo evidoc'h, pedit ive evit ho mamm).

BUGALE FALL a zo dizhenor ho zud er bed-ma. — E peleac'h ema ho merc'h hena ? a c'houlennet, eun devez, digant eur vamm. Hag ar vamm diroll da vouela : he merc'h a oa eat da guzat er penn-ti, he bugel bastard ganthi var he breac'h.

Ia, bugale fall eo pounnera kroaz, er bed-ma, evit tad hag evit mamm, ha marteze ar penn-kaoz ma kavint prennet d'ar baradoz !

I. — Deveriou ar priejou

Tri dever. Red eo :

Da genta, en em glevet. Trous ebet morse. Histor Dider, eur goas hag a lavaraz d'he bersoun en doa keus da veza dimezet. Perac ta ? eme ar belec. — Perac ? va grec e deus eun teod avalou put. — Ah ! ia. Mad, pa c'hourdrouzo, iviziken, arabat d'id respount netra nemet *Ora pro nobis*. Te velo e teui a benn da gompesa e speret.

En devez varlerc'h Dider oa er parc. Deuet creis-deis, n'oa mennec ebet a lein. Deut eun heur, hano 'bet c'hoas. Ha Dider d'ar gear.

— Feneant bras, d'ober petra out deut d'ar gear ?

— Da glasc va lein.

— Marc'h alar, didalvez, lounc he sizun.

— *Ora pro nobis*.

— Morzavellec, penn caouenn.

Hag ar c'hreg sevel he dorn : — Me ia da skei ganhez gant al loa bod.

— *Ora pro nobis.*

— Me scoio.

— *Miserere nobis.*

— Sco te, guelloc'h e ve ganhen.

— Oh ! ne scoin ket, da. Ne rin nemet respount d'as litanioù.
Pa roi peoc'h, me roio peoc'h ive.

Hag ar peoc'h a voa great.

Red eo eta en em glevet. D'an eil eo red :

En em garet. — Hag evit an dra-ze, arabat dimezi nemet gant unan a anavezit mad. « Kemer da bried, a lavare eun den fur, etouez da vignonet, etouez da amezeien, etouez tud ar barrez, ha ne vezi morse tromplet. » Ar re goz a lavare : Ar gedoun a bell a ia oll da lern. — Histor eun den da biou oa cozeet deus eur plac'h iaouanc deus a bell evit beza he bried. Ar vasvalaner a veule ar plac'h. Deus ar re furra oa, emezhan. Ar paot iaouanc a gemeras dillad eur paour hag a ieas da c'houlouen loja d'he zi. Lojet oa. Ha da vare hanter-nos e velas an hini oa c'hoapt da zimezi ganthan o vont, poa cousket he zud, da friandellat ne ouzoun e pelec'h. — Ar gedoun a bell a ia, aliez, da lern...

En em garet. Red eo c'hoas :

En em bardoni. — N'eus parcat hed ebed ha na ve ennhan eul louzaouen fall benag... Tenna al louzou. — Neus ti ebed ha na ve ket ennhan eur gomz rog benag. Petra da ober ? En em bardoni.

Fachet eo Mari, ne lavar ger
Ha tro he fenn ouz ar vogel.
Mouzet eo Iannic ha du he dal
Tost an arne da stracal.

Sellit an eil ous egile !... En em facha, mouzat ! Christenien oc'h, emechans. Chom mouzet ? da betra ? N'eo ket brao. En em zispartia ne c'hellit ket evit c'hoas, atao. Ha pa raffec'h, ne viot ket guell, pell dioc'h eno. Eur c'huezaden var an tam coumoul-ze, ha peoc'h en ti, Salver Doue !

D'ar pevare.

Da bep hini he labour. Ar re gos a lavare : mar gra pep-hini he vicher ar zaout vo, sur, diouallet mad.

Rac-se, e pep ti, d'an ozac'h, fouet ar c'har, pao an alar, brid ar marc'h, an aferiou bras. — D'ar c'hreg : an darzel, an

trebez, ar billig, al loa bod ha paner ar viou... Ar bragou d'ar goas, an tavancher d'ar vaouez. Brao ne ket gullet an tavancher gant an ozac'h hag ar bragou gant ar c'hreg...

D'ar pempet, bea fidel an eil d'egile. An avoultriach zo eur pec'het spountus. — Doanuis eo gullet eur paotr iaouanc, eur plac'h iaouanc o teuler ho c'hurunen er fanc. Mæs ne laeront nemet Doue. An den avoultrer ouspenn ma laer Doue, a laer he bried... Mancout a ra d'ar bromaesa great dirag aoter ar barrez.

D'ar c'huec'hved, poania evit mad an ti... Sonjal er gosni... Miret eur skudellat leaz a benn coan.

II. — **Deveriou ar vistri hag ar vestrezed**

An deveriou-ma a ell en em zastum e tri c'her :

Carantez,

Lealded,

Soursi christen.

Da genta, carantez. Tud int eveldomp. Eveldomp badiziant var ho zal, eveldomp bugale da Zoue ha galvet d'ar barados... Eun deis, marteze, huelloc'h evidomp-nhi en Envou... Paour int marteze. Ar baourentez ne ket eur pec'het. Jesus-Christ oa paour, ar Verc'hes Vari ive...

Calet ho stad ! cuitaat tad ha mam ; beva e ti an estren ; dibri bara deus tors ar re all.

Ho labour hor pinvidica... Arabat goulouen ma labourfent re, arabat ho disprijout, ho langachat... Kemeret soursi outho er c'hlenved, ho delc'her ken a zeuint da vad.

D'an eil, lealded. — Doue, neuden gam ebet enn'han : N'hi ive a dle beza leal. Leal dreist oll, e kever ar jervicherien.
Rac-se :

1^o Paea dezho ho labour ar pes a dal... pae d'ar c'houlou merket, — pae gounezet n'eo mui deomp... paea penn-da-benn ;

2^o *Qui domesticorum curam non habet, fidem negavit.*

Rac-se :

Rei dezho kelennadurez christen...

Delc'her ma c'heullint ho relijion.

Rei dezho scuër vad, aliou mad.

Arabat goulouen digantho netra enep ar goustianz.

Beilla var ho buez... piou heullont ?

Ho c'hass cuit, ma kendalc'hont, goude ar gourdrouzou, da veza fall... Plac'h ha mevel — aliez a goll bugel.

III. — Deveriou ar jervicherien

Ene eun holoraj meur a rod... re vihan, re vras... Oll eo red ho c'haout. Evelse, er bed, meur a stad dishenvel Jesus-Christ a lavare guehall : *Non veni ministrare sed ministrari.* — Pep stad a zo mad pa vez great mad ar pes a sell diouthi.

D'ar servicher pevar dever :

Lealded,
Labour goustiansus,
Respet,
Sentidigez christen.

Lealded. — Arabat kemeret hon unan, na rei d'ar re all, na lezel kemeret, na lezel da goll traou ho maestr... Ober evel d'hon tra hon unan.

Labour goustiansus. — Arabat chacha var an ibil ber, na laerez he voued, na laerez an amzer, na coll al labour, na lezel den da ober gaou.

Respet. — Dirazho : adren kein ive. Arabat discuil ho mankou, rei brud fall.

Sentidigez. — *Subditi estote, etiam discolis.* Mæs senti ervez Doue. Guerzit ho poan, ho labour, hoc'h amzer, ho nerz, mæs morse hoc'h Ene.

PEMPET GOURC'HEMENN

<i>Non occides</i>	{	Diouall ne lazi den ebet Nag a zezir nag a effet.
--------------------	---	--

Red eo :

Adori Doue,
Respeti hano Doue,
Respeti devez an Aotrou Doue,
Red eo d'ar vugale enori tad ha mam,
Red eo da dad ha da vam diorren mad ho bugale,
Red eo d'ar gristenien respeti an dud a ilis,
Red eo d'ar servicherien respeti ho mistri,
Red eo d'ar vistri respeti ho zervicherien,
Red eo da zaou bried ober an eil eurusded egile.
Mæs dianveaz hon ti, e zeus tud all en dro deomp hag en ho c'henver hon deus ive deveriou.
Evelse, red eo da genta :

I. — Respeti buez hon nessa

Ar vuez a zo c'huec d'an den. N'eo ket souez. Eus eun tu, ar maro zo c'huec : n'oamp ket, er penn kenta, crouet evit mervel... Eus eun tu all, var ar vuez eo diazezet oll vadou ar bed-ma.

Arabat eo rac-se :

Na tenna he vuez digant den,
Nag he diverraad, berr eo dija,
Nag he renta pounneroc'h — poanuis avoallac'h eo.

Hor buez a zeu digant-Doue : Doue, ebken, en deus guir d'he c'henna, d'he astenn, d'he moug. Den ebek n'en deus ar guir-ze, dreizan he unan.

Coulscoude, abalamour da vaga an urs vad ha da spounta an dud fall :

Ar c'houarnamant a c'hell barn d'ar maro.

Er brezell, e c'heller laza ar re en em zifen.

E c'heller laza an hini a glask tenna diganeomp hor buez : guelloc'h beza kiger eget beza leue.

Ne damalfen ket eur plac'h iaouanc hag a lasfe eun den hag a glasc he dishenori, ma na c'hell ket e gis all, en em zifenn diouthan.

Ne damalfen ket, zoken, an hini evit difenn eur somm bras a arc'hant a laz an hini glasc he laerez, ma clasc goude beza bet gourdrouzet cass he daol da benn. Anez al laer a ve brao he vicher.

Mæs a hent all eo difennet laza, neus fors pegement hon defe da en em glemm ous eun den benag.

Difennet eo ouspenn rei dorn da harpa ar muntrer, rei ali da laza.

Difennet eo erfin en em lacat, heb izom, ha gant guiziege vad en danjer da laza eun all.

Red eo, d'an eil :

II. — Respeti hor buez hon unan

Hor buez zo roet d'eomp, e prest, gant Doue. Gorto-zomp ma c'houlennno Doue he dra. Crenna 'r vuez, araog an heur merket gantha, zo laerez he vir.

Difennet eo, caeroc'h, en em lacat, nemet oc'h red, e danjer da goll ar vuez.

Erfin, difennet eo dichical, ober drouc, mac'hagni ha rag-se en em ganna. — Pa ve da en em glemm, grit eun

taol justepe, ha peoc'h. — Ne lavaran ket evelato, e ve eur pec'hed rei eun taol kildourn da eun trabasserie a vez atao o cancelad. Sec'ha dezhan he fri mæs heb he vlonsa, a ve labour gempen avoallac'h. Mæs da daoler evez a zo : clemm elfe dougen en hoc'h eneb.

Allazer a vez atao milliget gant Doue. [Histor Cain.]

Coulscoude,

Goassoc'h tra zo c'hoas : Laza an Ene.

En den, diou loden : corf hag Ene.

Jesus a gar an Ene eun eston. Sonjit petra eo ar baradoz, petra eo an ifern hag e veloc'h pegen bras eo laza an Ene.

Lod her gra, coulscoude.

Dre seuer fall,

Dre guzuliou fall,

Dre ho guall gomzou.

C'HUEC'HVED HA NAVET GOURC'HEMENN

Non mæchaberis { Lubric na vezi ket ive
Nag a gorf nag a volonte.
Na c'hoanta dre luxur pec'h
Nag e sonj vil n'en em blij.

Red eo respeti : Doue,

Hano Doue,

Tad, mamm, crouadur,

Buez ho nessa.

Red eo ouspen en em respeti hon-unan. Doue pa reas ac'hanomp hor c'hrouas ervez he bortret he imaj d'ezhan he-unan. Arabad eta na distruja na sklabeza ar portretze ennomp hon-unan.

Dapu dra, dreist ar re all, a ra d'eomp coll ar respet dleet d'eomp hon-unan : al luxur hag ar vesventi.

Sonjomp mad :

Ar pec'het, n'eus fors pehini, a zo, atao, eur merc a zempladurez. Pec'hi zo disken, zo kueza, pe en em izellaat.

Ar vertus, en eneb, hon huella, hor sav, hon tosta ous Doue :

Eun henor eo hag ar brassa, beza vertuzus.

Tenna rer an toc d'ar pennou kurunet, d'an dud e carg, d'an dud pinvidik ha ne dalvezont netra alies.

Eun den savet huel er c'hargou
A ell kaout pri eus he vragou
Ha pa vez lous bragou eun den
E saluder he garg ebken.

Pa dremenno dirazoc'h eun den vertuzus hag e ve dister, izel, paour, dizesk, tennit ho toc. Lezit da dremen an hini zo tost da Zoue.

Coulscoude etouez an oll vertuziou, zo unan caër dreist ar re all. Hounnez eo ar burete.

Hi oa caret ar muia gant Jesus-Christ, ne ket bet falvezet ganthan bea tamallet var an abeg-se. Evit mam e kemeras ar Ver'hez, evit mignon sant Ian.

Hi a zo bet ar muia caret gant ar Zænt.

Eur vertus eo, estimet gant ar re-fall ho-unan.

En distro :

Eur pec'het a zo hag a ziskar an den. Dinerza 'ra ar vuez, evel eur prenv, kuzet e kaloun eur frouezen, suna a ra an den beteg mel he eskern... Guelet a rer tud iaouanc deuet coz araog an oad a ugent vloas... bourrevi a ra ar galoun, naon atao d'ezhan. Ar pec'het-se eo al luxur.

Kent-se petra da ober evit en em ziuall dioutan ? Pedi. — Eur c'hrouadur en danger en em daol etre divreac'h he dad hag he vam... en em guzat a ra dindan askel an eal mad.

En em respeti — o telc'her he galoun pur hag o pellaat dious ar vesventi. — Tec'het dious an dangerou.

SEISVET GOURC'HEMENN HA DECVET GOURC'HEMENN

Non furtum facies { Laeres na miret madou den
Gant guiziegez na ri biken.
Na zouet madou da hentez
Evit ho c'haout dre fals-hentez.

Er bed-ma, lod paour, lod pinvidic. Doue zo mæstr da vadou an douar, ho rei pe ho lezel a ra gant lod ; da lod

e ro neubeut ; da lod ne ro netra. Gouzout mad a ra petra en deus da ober. En deis da zont e velimp hon-unan e ra pep tra evit ar guella. Ar binvidigez ne vez ket atao stag outhi eürusded : ar baourentez a vez aliez ar guir levenez d'he heul. Ha hent all ma vemp oll ker pinvidik ha ker pinvidik e ve ken otus an eil hag egile. Ha kaer zo hon deus izom an eil deus egile : ar pinvidik deus ar paour, ar paour deus ar pinvidik. Mæs eun dra 'zo hag a zellous peb den : red eo lezel he dra gant pep hini.

Al laër a vezo prennnet outhan dor ar barados : *neque fures, regnum Dei possidebunt.*

Hogen al laër zo evel ar skoul : diouaskel da baka he breis, daou bao d'hen derc'hel, bec d'hen diskolpa. Elvese ive al laër a c'hell, e teir fæson terri gourc'hemen an aotrou Doue ha noazout d'he nessa en he vadou :

- 1° O kemeret heb guir ar pezh a zo d'ar re all ;
- 2° O terc'hel heb guir ar pezh zo d'an nessa ;
- 3° O c'h ober coll d'an nessa en he zanvez.

Eur ger divar-benn ar rumm dud-man

I

Al laër a gemer.

Dalc'homp deomp ar pes zo deomp. Mæs lezomp ive he dra gant pep unan.

Kemeret heb guir mad hon nessa zo atao pec'het, pec'het bihan pe pec'het bras ervez ar pezh a gemerer pe stad an den a laërer.

Reolien guir atao

1° Eur pec'het marvel eo, kemeret divar goust unan ar pes a ve avoallac'h evit he zispign pemdeziec ;

2° Pa rer laëronsiou bihan gant ar zonzj da zastum abars ar fin eul laëronsi bras, neuze ha pa-na ve ket zoken ar zonzj-se, pa vez dastumet eur zom bras al laëronsi zo bras :

Eun neuden
Na grougo den,
Mæs cant neuden
A ra corden.

Madou deut dre 'n hent cam
A vihana tam ha tam
Hag eul laër mar marv pinvidik
A lez bugale reuzeudic

Rag, atao, malloz Doue
A gouez varnhan pe var he re
Heb counta c'hoas ar beac'h pounner
A zougo dirag ar barnier.

Coulscoude, stanc eo ar re a laër. Beza zeus anezho a bep seurt liou, a bep seurt ment, a bep seurt stad. Pet guech na lavaromp ket : neus mui na feis, na vad, na coustians, na lealded. Faos, oar deut da veza 'vel an dour red. Hag e guirionez, laëronsi zo a bep tu.

Ar pinvidic avechou a laër poan ar paour.

Ar paour aliez a laër an aluzen.

Ar marc'hadour a laër ar prener.

Poueziou faos, aliez :

Te zo re skanv, m'her goar ervad,
Mes pa verzan, te zo mad.
Te re bounner, mæs da brena
Te 'zigas din ar zam brassa.

Grouan etouez an ed : — ed brao var gorre, ed lous e fons ar zac'h, — kordennou koat, neiziou logod e creis.

— An toer mein a lavar :

Te jomo, te ne jomi ket
Ne lakin ennhout tach ebéd.

An oll a oar an diskan-ma :

Ar miliner, laër ar bleut
A zo daonet beteg he veud
Hag he veud zo an daoneta
Rag ma za er zac'h da genta.

Laër eo ar guerzer ma kemer en tu all d'ar pris merket :
— Laër an devezour a labour fall.

II

Al laër a nac'h a zo ker fall hag ar re all : me ne dan ket da laëres, mæs me gav var an hent ; gouzout a ran da biou eo ar pezh e meuz kavet. Neuz fors me hen dalc'h : Laër oun. — Prestet zo din : neus skrid ebet, me nac'h : Laër oun.

III

Laërez eo ive, c'hoas, ober coll d'an nessa heb guir : Laza loaned, troc'ha guez, rei goal aliou, ober eur vicher heb he anaout.

Al laëron, evel ma veler, zo stank. Stankoc'h vent c'hoas pa na vefte d'ar pezh zo merket en diskan-ma :

Micher al laër a ve tentus
Ma ve ganthi peoc'h padus.

Ar peoc'h ganthi 'n hini vank
Rag pik pe vran divar ar brank
A glev, a vel hag a ziskuil...
Eur vicher eo leun a drubuil.

Archerien zo. — Prizoniou zo ive hag an dud a gri hars al laër. Ha pa na glev ket archerien ar bed-ma, archerien Doue a glev atao, a zo atao var zeulioù al laër. Archer Doue eo prenv ar goustians. An dud a c'hell lavaret : Te zo den honest, archer Doue a respount : Te zo laër. En deis, en noz e lavar : Laër out, anavezet e vi abars ar fin. En deis, en nos e lavar : ar vuez zo berr, an eternite zo hir hag en eternite barados hag ifern... Ifern evit al laër, rag var dor ar barados eo skrivet : al laër adrenv !

Petra da ober pa vez laëret ?

Evit beza pardounet, eo red restaol. Eas eo kemeret, mæs diæs eo restaol. Coulscoude, red eo dic'haoui an nessa, pa vez laëret, pa vez dalc'het he beadra, pa vez great coll d'ezhan. Red eo restaol : *Non remittitur peccatum nisi restituatur ablatum*. Caout glac'har ne ket avoallac'h : *Si res aliena dum reddi potest non redditur, poenitentia non agitur*.

Red eo restaol : *in re pe in voto*. Kaout absolven heb an dra-ze ne dalvezo netra.

Mæs da biou restaol ? D'ar perc'hen pe d'he heritourien.

Piou a dle restaol ? Kement hini en deus great gaou, kement hini en deus heritet da unan hag en doa dle. Ne heller lezel en heritaj gant he dud he-unan ar pez a vanker d'ar re all.

Beteg pegeit restaol ? — Restaol an dra hed ha hed. — Restaol ar vad deut d'he heul, digoll ar gaou great dre laëronsi.

Pe da vare restaol ? Ar c'henta 'r guella.

Digareziou a ve clasket : ne ellan ket. — Avechou e ve guir. Red eo da vihana kaout bolontez vad, klask an tu da hellout restaol, kass atao ar pes a heller.... Me gasso va zud da baour !... Ia, marteze, sur zoken. Mæs difennet eo ho finvidicaat gant madou ar re all.

Guell brud vad gant paourentez
Eget gual vrud da heul danvez.

EISVET GOURC'HEMENN

Ne loqueris contra proximum falsum testimonium.

A enep den, fals testeni
Na gaou ebet na liviri.

An nep ne bec'h ket dre he deod, hennez a zo parfet, eme sant Jacques : « *Qui lingua non offendit, ille perfectus est.* »

Esop, guechall, a oue karget da ober eur fest bras... ne vo nemet teodou... gourdrouzet gant he vestr e respount : Guelloc'h eget an teot n'euz netra er bed. An teod a veul Doue, a lavar komzou mad... Mad, eme he vestr, gra deomp eul lein all, deuz ar pez a zo a falla nemet vo gellet ho dibri. Esop a ro adarre teodou. Rac, emezhan, n'eus ket falloc'h eget an teod dioc'h ma en em dro.

A enep an eisvet gourc'hemenn e rer dreist oll pemp seurt pec'hejou.

- 1° Ar fals testeni.
- 2° Ar geier.
- 3° An droug-prezegerez.
- 4° Ar fals prezegerez.
- 5° An drouc-sonjou.

1° *Ar fals testeni.* — Ar fals test eo an hini a rent eun testeni faos dirak ar barnier.

Dirak ar barnier e ranker lavaret ar virionez er c'his ma he anavezet nemet nez tost e veed d'an den tamallet. Lavaret gaou a ve eul le faoz, unan eus ar brassa pec'hejou : gaou a ra ouz an nessa, ouz ar respet a dleer da Zoue, ouz an urz vad.

2° *Ar gaou.* — Ar gaouier eo an hini a lavar gant goueziegezh ha sonj da fazia, eun dra hag a zo, ervez he greden, kountrol pe a enep d'ar virionez.

Da genta — gant goueziegezh, ervez he greden, gant sonj da fazia. E c'heller pec'hi o lavaret eun dra hag a zo guir pa zonjer eo eur gaou eo a rear. Mæs red eo e ve c'hoant da drompla.

Ar beg gaouier a laz hon ene : « *nos quod mentitur occidit animam.* » Lavarit ia, ia ebken, ha nann, nann, eme hor Zalver. N'eo ket ma ve atao red lavaret ar virio-

nez, pe he lavaret d'an oll : « *tempus loquendi et tempus tacendi.* » Lod a zo re-hir ho fri ; serri an or outho. — re gurius ho skouarn : lacat stoupebars. Arabatlavaret gaou, mæs clasc an dro heb anzaou ar pez zo c'hoant da devel. Ober tro ar pod heb tenna er meaz an tamm kig sall. — Var a leverer, sant Per a iez eun devez da verza he vioc'h. Pa c'houlenjot diganthan petra oa, e respounte ne dalie netra. Credit ne c'hellas ket he guerza... Petra zo caos, eta, Per, eme Jesus-Christ, ne verzes ket da vioc'h ? — Pa lavaran eo laer, eme Ber, fall d'an amann... den n'he c'hemer. — Per, eme Jesus-Christ, heb lavaret gaou, sko dezho abiou d'ar virionez.

Ha Per mont. — Laer eo ar vioc'h ? — Ne vezan ket ous he diouall. Leaz hag amann a zo ganthi ? — Ne vezan ket o c'horo nag o ribotat. Koz eo ? — Sellit en he ginou... Ar vioc'h oa guerzet en taol-ze.

Tri seurt geier 1° gaou fentus.

2° gaou noazus.

3° gaoutalvoudus. — Eur ger divar benn pep-hini.

1° Ar gaou fentus eo an hini a rear evit rei leac'h da c'hoarzin. Unan a lavare : me em euz gullet eur gaolen brassoc'h evit tour cathedral Kemper. — Ha me, eme eun all, eur pot houarn brassoc'h evit eun ilis. — N'eo ket guir eme ar c'henta. — Eo, eme an eil, eur pot great exprez evit poazad ho kaolen c'hui. — Gaou fentus ho daou. — Den n'ho c'hred. Ar gaou fentus a gount neubut ha peurliesha tam ebet dirag Doue.

2° Ar gaou noazus, eo an hini a rear evit ober droug. N'hi her guelo varlerc'h, hannvet eo falz-prezegere.

3° Ar gaou talvoudus eo an hini a rear evit en em zizamma an-unan pe evit dizamma eun all.

Mes : « *non sunt facienda mola ut eveniant bona* » : Ne dleer ket laret gaou evit tenna mad anezhan.

3° An drouc-prezegere. Drouc-prezeg eo dizoloi mankou an nessa dirag ar re ne anavezont ket ar mankou-ze ha n'o deus ezom ebet d'ho anaout.

Dirag ar re ne anavezont ket. Ne zrouc-prezeger ket evit lavaret d'an nep a c'hoar dija... Ha n'o deus ezom ebet... pa ve ezom n'eus ket a bec'hed. C'hui a ia da ge-

meret eur plac'h fall en ho ti... C'hui a c'houlén diganhen petra eo... Me he anavez hag a lavar : na rit ket se... n'em euz pec'het ebet : dre garantez eo e vankan d'ar garantez.

E pe c'his e trouc-prezeger ?

1° Ravodereziou

Lod ne lavaront ket pikol tra : grac'herez, commera-chou, ravodereziou, ar seurt traou-man ne vront ket mont d'ar barados... mæs plas ar c'houmperien, ar gom-merezed a dleffe beza er barados e toull ar skubenna-chou... Cazeten ar barados... var an douar ho flas muia darempredet eo ar ster, an ti forn, an davarn.

2° Goal deodajou

Ar goal deod a lavar goall draou. Hiniennou en em gemer dre finessa, a ra da genta kant tro d'ar pod : Ia, eun den mad... koulskoude... bah ! ne lavarin ket... mes evidon-me... Roet eo an taol flemm, etc., etc.

Lod all a lavar distagel. En em gemeret a reont peur-liessa ouz an dud muia estimet.

Peurliesha, da heul kementse, e kaver guarizi, jalouzi, — avechou c'hoant cozeal ebken, debroun e beg an teod. Teodou aer viber atao ar flemm er meaz hag atao bilimm outhan.

4° Ar fals-prezegere

An drouc-prezeger a lavar ouz he nessa an drouc a zo guir.

Ar fals-prezeger a ia pelloc'h. Sevel a ra eur gaou noazus evit he ziscleria goudeze.

Etouez ar goall deodou hema eo ar falla, an danjerussa, an hini ra ar muia droug.

Drouk e teir zoare : Lakad a ra an tan etre ar vignoned ar priejou, an amezeien, penn caos eo a zizunvaniez, a brosejou, a ienien, a voarizi.

Koll brud vad eun den honest, lakad avechou eun den mad da gueza, dre sizesper, en dizurs.

Ne respet netra, guelit J.-K., ar Zant. Ouz ar re vella eo ec'h en em laka da genta, gant ar brassa plijadur.

Mes ar bilim a gerz d'he heul. — Ha neuze ne istim, ne zarempred ket an den ma drouksonj divar he benn.

Guir eo n'eo ket mad fiziout en oll... mes brassoc'h mank eo c'hoas credi an drouk, eb kaout merk mad ebet.

Bugale ar goall deod

1° An teod ors. — An ors a zrail, a faout, a bil... an teod ors a daol da eun den e creis he zaoulagad ar brassa begadou hag a vezo foug eunnhan goudeze. Hen-ma zo he blas er c'hoajou gouez ha nann etouez ar gristenien.

2° An teod broud. — Ar vroud, eb rei ar maro, a bik, a doull, hegazi a ra, poan a ra... Lod teodou a zo evel ar vroud, atao dichikal, goapad, dispenn, rei leac'h da ziscredi, diskolpa tammou bihan... traou hegazus evel guesped.

3° Teod alumetezen... an alumetezen a laka an tan. Lod teodou ne reont nemet toulla d'ar re all, digeri an hent, lakad an tan da gregi.

4° Teod countel-gamm. — Ar gountel-gamm a droc'h done-monea. An troc'her dous a zo ar memes tra. Dira-zoc'h, en tu ganeoc'h. Adrenv ho kein en hoc'h eneb... tudidou plat, mad da lakad en toullou pri dindan treid an dud vad pa dremenont.

Petra rank ar goall deod da ober ?

Ar goall deod a ra drouk aliez muioc'h eget al laer. Al laer a gass ganthan va arc'hant, ar muntrer a denn diganhen va buez. Ar goall deod a denn eun dra a huelec'h pris aliez. Koll a ra va brud vad. Petra eo eur vuez dizenoret ?

Hogen kement hini a ra drouk a rank dic'haoui he nesa, e kement ha ma c'hell hag e kement ha ma zeo dleet.

Rag-se : Drouk-prezeget oc'h euz ? Ne c'hellit ket en em zislavaret, mes meulit, grit vad, etc.

Falz-prezeget oc'h euz ? En em zislavarit krenn, hag e rankfec'h tremen evit eun den fall. Diez eo :

Rod a dro
A ra bro.
Comz lavaret
Ne daper ket.

Koulskoude keit ha ma na vez ket digollet an nesa, ar pec'het a jomm.

Eun den o vervel a zeblante beza eurus. Lod a lavaras dezhan : n'o pezet ket re a fisians. Taolit evez na ve aze eur roued stignet gant an drouk-speret : oh ! emezhan, me oar mad em euz pec'het... N'euz fors, fisians em euz,

rak skrifet eo : « *Nolite judicare et non judicamini* ». Ne vamt ket ha ne viot ket barnet. Guir a lavare. Lezomp mad ar re zo mad, hag ar re zo fall, goaz a ze evitho, mes ne ziscullomp ket ho mankou.

Pe-hini eo dever ar re a gav eur goall deod.

Da unan hag a zo izelloc'h evidoc'h, mar teu dirazoc'h da zispenn he nesa, serrit crenn dezhan he c'hinou.

Da unan eus ar memes renk ganeoc'h, roit da gompren a ra deoc'h poan.

Da unan a zo huellloc'h, discouezit ne ra deoc'h tam plijadur.

VAR SAKRAMANT AR BINIJEN.

Eur c'halvez e penn he zervez a lavare : Krogomp er vouc'hal a dro vad, eur skour a zo da galveziat.

- 1° Digamma an tam koat ;
- 2° Her c'henna e leac'h ma 'z eo dleet ;
- 3° Tenna ar guignen er meaz ;
- 4° Tenna ar c'hoat brein dreist pep tra.

C'houi oc'h euz evel ar c'halvez, eun tam koat prisiuz da labourat : Hoc'h ene krouet gant Doue, krouet evit Doue, evit an Env, evit an eursted eternal.

- 1° Digamma, euna, divosa ;
- 2° Kenna.. ;
- 3° Distaga dioc'h an traou danjeruz ;
- 4° Tenna ar pec'het er meaz... Ha perag ?

Ne 'z euz nemet eun hent hag a gass d'an Env, hent ar zantelez.

- 1° Ar zantelez miret a oll viskoaz ;
- 2° Ar zantelez renevezet er galon.

Piou hor zikouro ? Sakramant ar binijen.

DIOU LODEN ER SAKRAMANT-MAN

- 1° Sakramant ar Binijen *ennhan he-unan* ;
- 2° Sakramant ar Binijen *en hini a dosta outhan*.

Kenta Loden

Aman pemp goulenn.

- 1^o Petra eo Sakramant ar Binijen ?
- 2^o Penaoz ha gant piou eo bet great ?
- 3^o Pegen talvouduz eo ?
- 4^o Pegen red eo d'an den tostad outhan ?
- 5^o Pegen nerzuz eo he c'halloud ?

§ 1^o *Petra eo Sakramant ar Binijen ?*

Araog respount eo red anaout petra eo ar Vertuz a Binijen. Ar Vertuz a Binijen a zo :

- 1^o Eur c'hlae'har vraz da veza pec'het ;
- 2^o Eur gasoni euz ar pec'het great ;
- 3^o Gant eur propos stard d'en em viret outhan hiviziken.

Glac'har, kasoni ha guir c'hoant, setu aze ar Vertuz a Binijen.

Dreizhi eo en em zalve ar pec'her araog Jesus-Christ.

Anezhi eo bet lavaret : Mar grit pinijen, ho pec'hejou n'ho kollint ket ; ma na rit ket pinijen ez eot oll da goll dre ar memes hent.

Ar vertuz-se a zo bet great anezhi eur Zakramant gant Jesus-Christ. Sakramant ar Binijen a zo eta eur zakramant great gant hor Zalver Jesus-Christ evit distruja an oll pec'hejou great goude ar Vadiziant.

Evit ma vezo Sakramant eo red :

- 1^o Aberz ar pec'her, kovesion, kontrision ha satisfaksion ;
- 2^o Ha varnezho aberz ar beleg, komzou an absolven : Hoc'h absolvi a ran euz ho pec'hejou en hano an Tad, ar Mab hag ar Spered Glân.

§ 2. — *Penaoz ha gant piou eo bet great ?*

Great eo bet gant Jesus-Christ, dreist oll goude ma 'z oa bet savet a varo da veo, pa lavaraz d'he Ebestel : Me ho kas evel ma 'z oun bet digaset va unan gant va Zad. Ar re ma o pezo pardonet d'ezho ho fec'hejou, o devezo pardon ; hag ar re na root ket d'ezho pardon euz ho fec'hejou, ne vezint ket pardonet.

§ 3. — *Pegen talvouduz eo ?*

Sakramant ar Binijen a spount kalz a dud. Kant digarez a glasker a eneb d'ezhan. — Perak Sakramant ar Binijen ?

1^o Sakramant ar Binijen :

A zigas da veo eun ene lazet gant ar pec'het.

A ro nerz d'an ene dinerz.

A zifen an ene ouz an danjerou heñ diskarfe ;

2^o Sakramant ar Binijen a zo mad :

Da zigas ar peoc'h er galon, da lakad ennhi esperanz ;

3^o Mad da ziskuez trugarez Jezuz-Christ ha da zerc'hel etouez an dud an urz vad hag ar vreudeuriach.

§ 4. — *Pegen red eo evit ar pec'her ?*

Kaer zo klask digareziou, Sakramant ar Binijen a zo eun dra red evit kement hini en deuz, goude ar Vadiziant, great eur pec'het marvel benag.

Ma c'hell ar vertuz a binijen pe eur gontrision barfet lakad Doue da bardoni d'ar pec'her, morse pardon ne ro nemet bolontez a ve da dostad. pa c'hellor, ouz Sakramant ar Binijen.

N'euz nemet daou hent hag a gasfe d'ar baradoz.

1^o Hent ar vertuz miret disklabez a oll viskoaz ;

2^o Hent ar vertuz renevezet goude pec'hi, dre Sakramant ar Binijen.

Setu perag S^t Jerom a lavare : Sakramant ar Binijen a zo eur planken a zavete taolet da eun den kouezet en dour.

Guelit eur merdead, etc...

Ma sonjemp mad, Sakramant ar Binijen a zo kentoc'h eur vad evidomp eget eur beac'h.

Bezit pinvidig, etc. ma ne d'oc'h kristen, Sakramant ar Binijen n'eo ket great evidoc'h...

Bezit paour... pec'her braz, etc... e c'hellit mont da gaout eur beleg ha lavaret : Pardonit ac'hanon...

§ 5. — *Pegen nerzuz eo ?*

1^o Sakramant ar Binijen a zistruj an oll pec'hejou.

Pec'het ebet (nemet unan : Ar c'hoant da vervel en he bec'het) ha ne c'halfe beza dreizhan pardonet. Digasit d'in ar brasa pec'her etc... pardon zo evithan.

Hag e ve ho pec'hejou ken niyeruz hag ar bleo zo var ho penn hoc'h ene a c'hell a nevez dont ker guen hag an erc'h, eme al leoriou zakr ;

2° Distruja a ra ar pec'het ken aliez ha ma karer.

An den, peurvuia, ne bardon nemet eun nebeut guechou ; Doue a bardon ken aliez ha ma vez ezom.

Ped guech e pardonin-me ? à c'houlenne St Per ; eur vech, diou pe deir ?

Na diou na teir eme Jezuz-Christ, c'houi a bardono seiz guech dek guech ha tri ugent. Da lavaret eo : heb kount ;

3° Sakramant ar Binijen a zistruj ar pec'hejou evit mad. Pec'het eur vech pardonet, ne vezo mui tamallet gant Doue d'an den ; ne asvevo mui. *Sine pœnitentia sunt dona Dei.*

E pep pec'het ez euz tri zra :

1° An ober fall ;

2° Ar zouilladurez a zeu euz an ober fall-man ebarz an ene ;

3° Ar boan staget gant justis Doue ouz peb ober fall.

Ar zouilladurez hag ar boan dleet d'ezhi a vez distrujet gant Sakr. ar Binijen.

Koulsgoude :

An affeil a zo eur goall dra, rak dinerza atao a ra an ene muioc'h mui, hag a hent all e vihanna trugarez Doue.

Koulsgoude c'hoaz :

Sakramant ar Binijen n'hell ket distruja en eur galon eur pec'het marvel heb distruja eur pec'het marvel all, mar deuz ebarz ouspenn unan. Klask en em zizober euz lod pec'hejou marvel, en eur zero'hel mad da unan, a zo miret ouz Doue da bardoni nikun anezho.

4° Sakramant ar Binijen a zigas da veo an oberou lazet.

Tri seurt oberou a c'heller da gaout en eun den :

1° Oberou beo ; da lavaret eo, ar pezh a vad a rer keit a ma vezer e stad a c'hras ;

2° Oberou marvel ; da lavaret eo, ar pezh a ro, pa her gear, ar maro d'an ene ;

3° Oberou lazet : kement tra vad zo bet great e stad a c'hras, mes bet lazet goudeze gant eur pec'het marvel, rak he-man, evel an tan goall, a zistruj peb mad en ene.

Sakr. ar Binijen a zistruj an oberou marvel, hag ouspenn a zigas en dro da veo an oberou lazet. Eun ene pardonet a zo restaolet d'ezhan, gant mignoniach an Aot. Doue ann oll binvidigeziou spirituel en devoa kollet dre ar pec'het marvel.

An oberou maro, ar re great e stad a bec'het marvel, a jomm atao maro.

Eil Loden

Sakramant ar Binijen *en hini a dosta outhan*

Sakramant ar Binijen ne ro pardon nemet d'ar re a dosta outhan evel ma 'z eo dleet.

Resevet e stad fall, e leac'h rei pardon e laka eur pec'het a gresk var goustianz an den, hag e ra ober eur sakrilaj.

Evit hen reseo evel ma 'z eo dleet ha gant fizianz da gaout ennhan pardon euz ar pec'hejou eo red var eun dro e ve ennhan pevar damm. — Histor eun trebez, pevar damm ennhan : tri droad hag eur c'harlantezen. — D'eoc'h-hu ober an tri droad, d'ar c'hovesour da ober ar gurunen, etc.

1° Kovez mad ;

2° Kaout eur guir glac'har ;

3° Beza rezolvét da zatisfia.

Eur ger eta divar benn ar govesion, ar gontrision hag ar zatisfaksion.

§ 1° *Ar govesion*

Aman pevar goulen :

1° Petra eo ar govesion ;

2° Pegen red eo ;

3° Pegen talvouduz ;

4° Petra rank beza evit beza mad.

I. — PETRA EO KOVEZ ?

Kovez a zo diskleria da eur beleg hag en euz galloud da rei an absolven, an oll bec'hejou, evit ma vezint pardonet.

Er gador govez ar beleg a zalc'h leac'h Jesus-Christ, en euz galloud Jesus-Christ. Beza eo var eun dro :

1° Eun tad hag a gemer truez : Ho pennoz, va zad, rak pec'het em euz ;

- 2° Eun doktor evit hor c'helen, hon difazia, hor rên... ;
3° Eur medisin evit hor para.

Dirazhan e tleomp en em damall hon-unan, dizoloi hor buez... n'eo ket an tu mad, direbech, mes an tu fall, an tu stlabezet...

II. — PEGEN RED EO AR GOVESION

Evit beza pardonet eo red mad kovez *in re pe in voto*, e guirionez, pe da viana kaout c'hoant d'hen ober.

Kovez ar pec'hejou marvel.

Pa c'heller kovez, eo red kovez (*in re*).

Pa ne c'heller ket kovez eo ret kaout c'hoant d'hen ober (*in voto*).

Kaozeal a rer a eneb ar Govesion ; n'eo ket souez, rak n'euz netra hag a goustfe kement d'an den. Diez eo kovez, anzao ar pezh a garfet kuzet ouz lagad eur mignon, ouz skouarn eur vamm hag ouz hor c'houstiansz hon-unan.

Mes 1° Doue a lavar eo red kovez ; 2° An Iliz a lavar eo red kovez.

§ 1. — Doue hel lavar

Ar pezh o pezo diereet pe ereet var an douar a vezo ereet pe diereet en Env.

« Me ho kass, eme J.-C. d'he Ebestel, evel ma 'z oun bet digaset gant var Zad. »

Digaset oa bet evit rei pardon ; it hoc'h unan da gass ar pardon : ar pezh a bardonot a vezo pardonet, ar pezh na bardonot ket, pardon ebet n'en devezo.

Ar c'hovesour a zo lakeat gant Jesus-Christ da varn ar c'houstiansou ; hèn eo a c'hell pardoni, ha n'euz nemethan.

Petra dalvefe d'in-me rei d'eoc'h alc'houez ho ti, mar deuz eun alc'houez all ?

Ha penaoz barn, nemet anaout a rafe kalon an dud.

Ha penaoz anaout ar c'halonou nemet an dud a zeuffe ho unan d'en em rei d'anaout.

Setu perak Konsil ar gear a Drant a lavar : « Ma lavar unan benag n'eo ket red, aberz Doue (Jure divino), kovez an oll bec'hejou marvel ha pep-hini en he bart, ra vezo milliget. »

Kement-man zo bet atao kredet abaoe Jesus-Christ. Anez e ve red lavaret eo bet chenchet lezen Doue.

Ha mar d'eo bet chenchet, ez eo :

1° Pe en eun taol kount ;

2° Pe nebeut a nebeut.

Hogen. — 1° Ma vije bet great en eun taol kount eun hevelep tra, an oll o divije en em zavet a eneb. Hag e neb leac'h ne gaver testeni ebet a gementse ;

2° N'eo ket bet great tamm ha tamm, na gant gouiziegez an dud ; n'o divije ket lezet, gouzanvet hen ober. Nag heb gouzout d'ezho, rak beza eo eun dra re ziez.

Ha hent all, testeniou a zo e ranket mont da govez er penn kenta euz an Iliz.

§ 2. — An Iliz a lavar :

Red eo mont da govez.

An Iliz a zo karget d'hon rên, hag hi a lavar e Konsil Latran : « Pep den deut d'ezhan he rezoun, a dle kovez he oll bec'hejou, da nebeuta eur vech ar bloaz, panefe-ze, ra vezo serret outhan dor an Iliz epad he vuez ha dor ar vered goude he varo. »

Evelse :

Bugale, tud vraz, tud paour, tud pinvidig..... oll, dindan boan da derri lezen Doue hag hini an Iliz a rank kovez.

Ha pe da vare eo red kovez ?

1° Pa vezer var nez mervel.

Ma roer avechou ar zakramanchou diveza da eun den ha ne govesae ket keit ha ma oa yac'h, ha ne c'hell mui hen ober da heur ar maro, n'ho roer nemed en eur grenn, ha var eur marteze.

Marteze peden eur vam vad...

Marteze sonj he bask kenta...

Marteze eun aluzen...

Mes n'euz nemet eur marteze ;

2° Red eo kovez abarz kommunia, pa vezer e stad a bec'het marvel ;

3° Red eo kovez, ken aliez guech ma na c'heller, heb mont da govez, diouall deuz ar pec'het marvel ;

4° Red eo mont da govez eur vech ar bloaz. Mes pa vezer, araok ma teu fin ar bloaz, er stad a bec'het marvel, ha red eo mont da govez araok an amzer merket, dindan boan da ober eur pec'het marvel all ?

Ar pez a zo sur eo : it da govez ar c'henta ar guella, rak :

- 1° Mar daleit, ar maro a c'hell dont ;
- 2° Keit ha ma chommot er pec'het, e viot dinerz hag heb nerz-kalon ;
- 3° Keit ha ma chommot er pec'het, hoc'h oll oberou ne c'hounezint d'eoc'h rekompanz ebet evit an Env.

III. — PEGEN TALVOUDUZ EO AR GOVESION

Kalz a lavar : da betra mont da govez ?
Pa'z eo ar govesion great gant Doue, e tle beza mad da eun dra benag.

Da betra eta eo mad ?

- 1° Da zigerri dor an Env serret gant ar pec'het ;
- 2° Da zigas ar peoc'h er galon. *Per quo peccat quis, per hoc et torquetur.* Ar pec'het a zo eur preon er goustianz, eur mean milin var ar galon... eul laer...

Ego te absolvo... Vade in pace... E maoc'h pareet, dizammet, pinvidikeat...

Da betra eo mad kovez ?

Goulennit digant ar bugel-ze, kemeret ganthan eur pleg fall.

Digant ar micherour-ze, difeiz pell amzer a oa... bour-reo greg ha bugale...

Digant ar servicher... digant ar vistri...

Digant ar c'hreg paour a oa o vont d'en em grouga, etc...

Digant an den-ze, bet laeret he zanvez, hag a vel an danvez-se restalet.

En eur ger.

Ar govesion a zo mad :

- 1° Da zevel ar pec'her ;
- 2° Da gonsoli ar galon ;
- 3° Da lakad ar garantez hag an urz vad da rên guelloc'h eget an archerien hag oll lezennou an dud ;

4° Mad eo, dreist-oll, da rei nerz en heur ar maro : *Proficiscere anima christiana... Beati mortui qui in Domino moriuntur.*

Enebourien ar govesion eo techou fall ar spered ha re ar galon, hi eo en em zav en he eneb hag a lavar :

1° Perag mont da govez, ne 'm euz na lazet na laeret.

Guell a ze ; ne deot ket douetuz braz d'ar galeou ; mes,

evit kementse, n'oc'h ket sur c'hoaz da vont d'an Env, rak n'eo ket hebken deuz al laër hag ar muntre eo e ve serret dor ar baradoz... Ha Doue, hag an nesa, hag hoc'h ene hoc'h unan, etc... ;

2° Perag mont da govez ?

Se oa mad p'edon er c'hatekis, mes hirio ?

Hirio ive, hirio muioc'h c'hoaz, rak brasoc'h eo an danger, tostoc'h ar maro, etc... ;

3° Perag mont da govez ?

An hen-man-hen a vez o kovez ha ne dal ket kement ha me !

Neuze a dri unan :

1° Pe an hen-man-hen a govez fall ;

2° Pe an hen-man-hen a zo danvez fall ennhan pa ne vella ket ;

3° Pe c'houi a zo evithan eur valanz faoz en ho torn ;

4° Perag mont da govez ? ne zistroin ket var vell. Piou a c'hoar ? Marteze, evit falloc'h ne deuot ket da veza, rak er gador govez ne vez roet ali fall da zen.

Petra dle ar govesion beza evit ma vezo mad ? Kovesionou a zo hag e leac'h beza mad ha distruja ar pec'het, a zo eur pec'het a vuic'h.

Konfesionou a zo, ha petra benag n'int ket eur pec'het nevez, ne dalvezont netra.

Eur govesion vad hebken a zavete an ene.

Guelpomp eta petra rank ar govesion beza evit ma vezo mad :

Savet e rank beza var bevar bost :

1° Kenta post : eur mennoz kristen ;

2° Eur guir humilite ;

3° Al lealdet ar vrasa ;

4° Ar virionez hed-ha-hed.

Setu ar pevar bost.

POST KENTA

Eur mennoz kristen

A zaou unan : Pe ni a zo er stad a bec'het marvel, pe er stad a bec'het veniel.

Mar e maomp er stad a bec'het marvel, hor mennoz a

zo kristen pa zeomp da govez gant ar c'hoant da veza digemeret e mignoniach Doue. Mar e maomp er stad a bec'het veniel, pa zeomp da govez gant ar c'hoant da greski gras Doue en hon ene.

Mar deomp da govez gant eur zonz hag a zo fall beteg beza pec'het marvel, e reomp eur pec'het marvel. Mar deomp da govez gant eur zonz ha ne zisken ket izelloc'h eget ar pec'het veniel, e c'hellomp c'hoaz ober eur pec'het marvel, a lavar deomp lod deuz an theolojiane; ha kementse a c'hoarvez, emezho, ken aliez guech ma zeomp da govez heb sonjal *tam dioc'htu*, ober an distera plijadur da Zoue, mes o klask, ha *netra ken*, hor mad er bedman, e leac'h mad hon ene.

EIL POST *An humilite*

Pec'hi a zo en em zevel a eneb Doue.

Ar govesion, great evit distruja ar pec'het, a dle hor plega dindan dorn Doue.

Red eo eta kaout :

Eun doare humbl ;
Komzou humbl ;
Eur galon humbl ;
Eur spered humbl.

Kovez a zo anzaon on deuz pec'het dre hor faot honunan. Rak-se bezit :

1° Humbl a gorf. — Var an daoulin, etc. ;

2° Humbl a c'hinou. — Ne dleer ket kovez evit en em veuli, lavarit hebken ar pezh a fall oc'h euz great ;

3° Humbl a galon. — Er gador govez ne dleit sonjal nag en ho skiant, nag en ho teskadurez, nag en ho tanvez, nag en ho karg... en ho pec'hejou hekben ;

4° Humbl a spered. — « Vade ad Ananiam. » Ar c'ho-vesour eo ar barner, ar rener, ar mestr, — etre he zaouarn e ma ar stur, plegit d'he gomzou, heullit he aliou.

Bossuet eun devez a c'houlennaz ment da govez gant eur relijiuz simpl. Heman a argilaz, en eur lavaret : Penaoz, me, netraik ma 'z oun, a gredfe barn eun eskop ker guizieg. — Den difeiz, eme Vossuet, ha ne c'houzoc'h-c'houi ket e ro Doue d'eomp sklerijen da ren ar re all, ha

ne lez ganeomp nemet tenvalijen d'en em ren honunan ?

Mankout da veza humbl a zo pellad gras Doue ; guelit ar Pharizian hag ar Publikan en templ... beza eo c'hoaz en em lakad en danjer da ober eur govesion fall, rak...

TREDE POST

Ar virionez

Etre ar govesion hag ar Varn ne dle beza netra dishenvell, nemet ar genta zo great e kuz, hag hou-man a vezo great dirag an oll ; red eo eta e ve guirion.

Hogen, e c'heller mankout d'ar wirionez e diou c'hiz :

1° O lavaret re ;

2° O lavaret re nebeut.

Attila, var a gounter, a gasaz eun ofiser, guisket d'ezhan mantel he vestr, da gaout Sant Leon... Heman a lavaraz : « Taolit a gostez ar viskamant-se, ne zere ket ouzoc'h. »

En em ziskuezomp evel ma e maomp.

Ar berra hent evit beza guirion eo kaout :

PEVARE POST

Al lealdet

Al lealdet en em asten var dri zra :

1° Ar pec'hejou ;

2° An niver anezho ;

3° Ar sirkonstansou bras.

AR PEC'HEJOU

Tri seurt pec'hejou a c'hellomp da gaout :

Pec'hejou marvel ;

Pec'hejou veniel ;

Pec'hejou amehoulou pe amzivin.

Ar pec'hejou marvel a rank, dindan boan a zakrilaj, bezakoveseat beteg an diveza, *dioc'h renk* ha *dre ho hano*.

Kuzet, nac'h unan, dre hor faot, a ve ober eur zakrilaj.

Ankounac'had en despet deomp, ne laka ket ar govesion da veza fall.

Mad, talvouduz eo diskleria ar pec'hejou veniel, petra benag n'eo ket red hen ober dindan boan a zakrilaj.

Ar pec'hejou amc'houlou, amzivin eo ar pec'hejou a zo diez d'anaout.

Diez anaout pe on deuz ho great, pe n'on deuz ket.

Diez anaout pe hi a zo pec'hejou marvel pe bec'hejou veniel.

Diez gouzout pe hi a zo bet koveseat a ziaraog pe jommet a gostez.

Ar guella, ar furra eo ho c'hovez evel ma ho guelomp.

NIVER AR PEC'HEJOU

N'eo ket aoualc'h lavaret eur pec'het ; red eo lavaret ouspen ped guech eo bet great.

Tremen eur vech heb oferen a zo fall, mankout dek guech a zo dek guech falloc'h...

AR SIRKONSTANSOU BRAZ

Darn deuz ar sirkonstansou a chench ar pec'het :

Laerez so pec'het, laerez an ilis a zo eur pec'het sakrilaj.

Darn a ra d'ar pec'het kreski :

Mac'hagna eun den a zo pec'het ; mac'hagna eun tad a familh a zo brasoc'h pec'het.

Darn all a vihanha ar pec'het :

Drouk prezeget em euz, mes euz a eun den hag en doa, da genta, falz prezeget ac'hanon.

Mad, var gement-man, setu ar reolen da heulia :

Red eo lavaret ar sirkonstansou a jench ar pec'het.

Mad, fur eo lavaret ar sirkonstansou ne reont nemet he greski pe he viannad.

OUZ PETRA E TLEER MUIA EN EM ZIOUAL PA 'Z EAR DA GOVEZ

An diaoul a unan gant ar bed ha techou fall hor c'halon ne glask nemed hor c'holl. E peb leac'h e teu d'hon heul, d'ar gador govez koulz hag el leac'hiou all. En em zic'hiza a c'hoar evel ma kar, ha meur a hano dishenvel a gemer, meur a c'haou a lavar.

Dizolomp he dal hag an hanoiou a gemer peurvuia :

Da genta : an diaoul mud ;

D'an eil : an diaoul mezeg ;

D'an trede : an diaoul diskredig pe difiziuz ;

D'ar bevare : an diaoul skorpuluz ;

D'ar pempet : an diaoul farouel ;

D'ar c'huic'hvet : an diaoul penn skanv.

Guelomp petra int ha petra reont.

1° *An diaoul mud* eo ar goasa, heman a vir na lavarar an oll bec'hejou, pe d'ho lavaret sklear aoualc'h. Ego te absolvo... a lavar ar beleg ha Doue a respount : pardon ebet...

Histor prosesion antousseged. An tousseged bian a iea, a iea, an tousseg braz a jommaz, hag ar re all da zistrei var hor c'hiz...

Eur gaou a lavar evit trec'hi an den : Ma kuze da bec'het, den n'hen anavezo... eo...

1° Doue... ;

2° C'houi hoc'h-unan, ho koustianz brevet ;

3° Ar bed oll, eun dervez da zont.

2° *An diaoul mezeg* Eur gaouiad eo ive. Araog ar pec'het e lavar : « An dra-ze n'eo netra ! » Goude ar pec'het e lavaro : « spountuz eo ar pez oc'h euz great » ha neuze e lakaio ac'hanomp da glask kant troidellerez, kant digarez evit krenna, anter-c'holo ar pec'het, er gador govez, etc., ha goudeze morse ne vezer laouen aoualc'h.

Evit en em zifen :

1° Pedi da c'houlou nerz...

2° Sonjal eo ar c'hovesour eun tad boazet da velet goulioar ar galon ;

3° Sonjal ec'h estimo ac'hanoc'h seul-vuioc'h ma vezo brasoc'h ho lealdet evit diskuill pep tra ;

4° Diskleria da genta eun-hag-eun ar pec'het pounnera ; ar re all goudeze a deuio evel var ar marc'had.

Histor al labourer en d'oa eur c'hrignolad ed ha daou gaz, unan bian hag unan braz. Evitho e reaz daou doull en or, unan braz d'ar c'has braz, unan bian d'ar c'has bian. Kleo-'ta, eme eur mignon, an toull braz he-unan, a vije bet aoualc'h, etc... ;

5° Sonjal eo mud ar c'hovesour er meaz euz ar gador govez.

3° *An diaoul diskredik.*

Na c'hellomp ket dougen hon-unan pouez eun dristidigez

vraz, ha tristedigez ebet n'eo par d'an hini a zo en eur goustianz karget a bec'hejou.

Red eo eta kaout fizianz er c'hovesour. Ma ne blij ket d'eoc'h, it da gaout unan all ; arabat hen ober re vuan koulskoude. Ne dleer ket troka kovesour evel ma chenchere krez, etc...

4° *An diaoul skorpuluz.*

Dreizhan he-unan ez eo diskorpul, mes skorpuluz eo pa gar.

Petra eo ar skorpul ?

Eun aoun direzoun ha dreist vuzul na veed er stad a bec'het. « Formido peccati, levibus motivis concepta. »

Skorpul guirion a zo.

Skorpul faoz a zo ive.

Ar skorpul faoz a goll fizianz evit pec'hejou dister.

Ar skorpul guirion a gemer, heb guir abeg, eur spount direzoun araog ar pec'het.

Ar skorpul a voug peoc'h ar goustianz ;

Ar penn kaoz anezhan eo :

1° Avechou bolontez Doue, a deu evelse da burifia muioc'h mui eun ene ; mes neuze an den skorpuluz a zent atao dez an hini a zo karget ganthan da ren hegoustianz ;

2° Peurlieassa, ar penn kaoz eo an diaoul, a glask, er giz-se, lakad ar pec'her da falgalon.

Remed ebet ne gaver, nemet ar zentidigez ar vrasa ouz ar c'hovesour.

5° *An diaoul farouel.*

Eur farouel eo an hini a gomz a gleiz hag a zeo, heb fin ebet, euz ar pezh a zell ouz ar re all koulz hag euz ar pezh a zell outhan he-unan.

Lod er gador govez, a ra kentoc'h kovesion ar re all eget ho hini ho-unan...

Eur c'hreg... kovesion he fried. Eur c'hraouadur, kovesion breudeur, c'hoarezed, kamaladet... eur zervicher, kovesion ar mistri...

Histor... Eur c'hreg o kovez... nebeut a dra divar he fenn he-unan, goall govesion divar benn he fried... Evit pinijen, c'houi lavaro eur chapeled evit ho pec'hejou, ha tri evit re ho pried. Mes, va zad... n'eo ket d'in-me...

d'am fried eo... Ia, pa ne goveseot nemet ho pec'hejou hoc'h-unan !

Lod evit lavaret eur pec'het a glask kant ha kant tro, displega reont eun after penn-da-benn... ne vez ket sklear peurvuia, etc.

Ar govesion verra eo ar vella, pa vez sklear ha guirion... Koll amzer eo klask eur spillen en eur golzen blouz.

6° *An diaoul penn-skanv.*

Eur penn-skanv ne zonz a zevri e netra... An diaoul a zo penn-skanv pa gar.

N'eo ket eaz lenn piz e goeled ar galon, anaout mad an oll pec'hejou... red eo evit se teuler evez mad...

Al laboused a guz mad ho neiz... hag an diaoul he bec'hejou.

Ho c'hask mad 'zo red koulskoude ; an diaoul skanv a vir ouzomp kementse. Lod a rank tenna ar pec'hejou dez ho c'halon evel ma rank ar c'hantonier tenna ar vein dez ar vengleuz.

Kement-man a ra d'in komz d'eoc'h euz ar pezh a ranker da ober araog ar govesion.

EKSAMIN A GOUSTIANZ

Petra eo eksamina ar goustianz ?

Pa brenomp eun dra e c'houlennomp kuzul, e sellomp piz... ober koumanant, prena loen, mezer, etc... Anez en em fazifemp aliez. Setu petra eo ober an eksamin a goustianz.

Evit ar goustianz er memez tra : furchal e pep korn, e pep pleg.

1° Alumi eur c'houlaoen. 2° Kemeret eur mellezour.

3° En em lakad mad dirag ar mellezour-ze, diskuez dirazhan eil tu hag egile bizaj an ene... Tro leur digolo, tro-leur biz, skuba, dastum pep tra...

Red eo ober eksamin.

Evit diskleria ho pec'hejou e rankit ho anaout ; evit ho anaout, evesad... mes :

Penaos ober an eksamin ?

1° Gant devosion, goulén sklerijen digant Doue.

E Rom ez euz aleou didan an douar, troidellerez tenval... red eo kaout goulaouen evit mont enno, hag ouspenn, eur rener...

Ar c'houlaouen eo gras Doue.

Ar rener : var betra e tleer en em eksamina ?

Pep bro e deuz he leor lezennou.

An Iliz ive... En em eksamina :

Var gourc'hemennou Doue ha re an Iliz.

Var ar seiz pec'h et kapital.

Var deveriou hor stad.

Var hon techou fall.

Var hor labourou kustum.

Var an dud a zarempredomp.

Var hon aferiou, etc.

AR GOVESION JENERAL

Ar govesion jeneral a zo eur govesion a rear ouz ar vuez hed-ha-hed, pe euz eul loden deuz ar vuez-se brasoc'h eget an amzer dremenet abaoe ar govesion diveza... pemp bloaz, dek... ugent vloaz pe ouspenn.

Ar govesion jeneral a zo :

1° Red evit lod.

2° Talvouduz da galz.

3° Noazuz da eun nebeut.

1° Evit lod eo red ober eur gouvesion jeneral. Poaniuz eo anzao he bec'hed... Guelit Adam, Eva, Kain... Atao ez oar ar memez tud. N'eo ket eta red beza re zouezet ma ra lod kovesionou fall.

Tud o c'houennat a c'holo al louzeier fall el leac'h ho zenna.

Hogen, pa vez great kovesionou fall, eo red ho renevezi oll ; an hini fall da genta.

Pa vez digoret mogerioù eun ti savet var douar blod, e ranker dispenn traon ha kreac'h.

Evit an ene, memez tra, etc.

Gouzout a ran eo kalet rankout displega ar vuez penn-da-benn...

Arabat kaout aoun koulsgoude ; selaouit hor Zalver Jesus-Christ :

« Pater, ignosce illis, nesciunt enim quid faciunt » hag

eurusa dervez eur c'hovesour eo an hini ma c'hell pardoni aliez a bec'hejou...

Ober eur govesion jeneral n'eo ket ken diez a ma sonj lod...

Thereza ha pemp guennek n'int netra ; Thereza, pemp guennek ha Doue a zo tout. C'houi, ho kovesour ha Doue da heul a renko mad pep tra, heb re a boan.

2° Ar govesion jeneral a zo talvouduz evit kalz a dud.

1° Pa veler en eur renkat, he oll bec'hejou, e vez anezho muioc'h a geuz.

2° Aliez ar c'hovesionou kustum a vez bet great heb kalz aket, heb sonjal aualc'h er gontrision.

3° Mad eo dreist oll pa rer ar pask kenta, pa jencher stad a vuez, pa dosta ar maro, pa vez eur retreat.

3° Ar govesion jeneral a vez noazuz peurlies a d'an dud skorpuluz... Ne gavont ket muioc'h a beoc'h ; hint koulsgoude a glask dalc'h mad ober kovesion jeneral.

Ar Gontrision

Pevar goulenn :

1° Petra eo ar gontrision ?

2° Pegen red eo he c'haout ?

3° Petra rank beza evit ma vezo mad ?

4° Petra da ober evit he c'haout ?

Petra eo ar gontrision ?

Eur glac'har er galon hag eur gasoni ouz ar pec'h et kometet gant eur *propos* start d'en em viret ouz ar pec'h et an amzer da zont.

Henvel eo deuz eur pont.

Evit ober eur pont, tri blanken zo red : eur post en eun tu, eur post er c'hostez all hag eur planken a dreuz da vont deuz an eil tu d'egile, setu great ar pont... Histor Fanch ar pillauer... Ar gontrision a zo ar memez tra.

1° Eur post var an amzer dremenet : eur glac'har er galon ;

2° Eur post all var an amzer da zont : eur *propos* start d'en em viret ouz ar pec'h et ;

3° Eur planken varnezh ho daou : eur gasoni deuz ar pec'h et.

Oll e c'houzomp petra eo ar glac'har, piou n'eo ket bet glac'haret eun dro benag ?

Oll e c'houzer ive petra eo ar gasoni : piou n'euz ket bet kaz ouz eun dra benag ?

Oll c'hoaz ec'h anavezzer petra eo eur propos start. Eur bugel en euz laeret mél er gestennad venan, goall flemmet, propos start ne laero mui.

Troadet ho pal, ... mes distroada ra, n'eo ket start, n'eo ket yennet an troad.

Mes an daou beul, ar planken a rank beza great gant koat yac'h... red eo kaout eur guir glac'har, eur guir bropos, eur guir gasoni.

Pegen red eo kaout kontrision ?

Heb kontrision, pardon ebet.

Avechou n'eo ket red kovez, meur a vech n'heller ket hen ober. Atao eo red kaout kontrision.

Abalamour da ze eo red ive da bep kristen gouzout mad petra eo ar gontrition barfet.

Kontrision barfet : eur glac'har da veza ofanset Doue abalamour ma 'z eo eun tad karantezuz, din da veza karet dreist pep tra.

Kontrision imparfet : eur glac'har da veza ofanset Doue abalamour d'ar boan meritet : an ifern, abalamour d'ar pezh a zo kollet : ar baradoz.

Petra e tle ar gontrision beza evit beza mad ?

1° E tle beza er galon, n'eo ket aoualc'h e ve var beg an teod. Eaz eo trompla an dud ; ne c'heller ket trompla Doue. — Histor laer ar pér ;

2° E tle beza dreist natur.

Kaout keuz rak ma en euz ar pec'hed noazet d'hon danvez, d'hor iec'het... ne dal netra. Red eo kaout keuz rak ma on deuz dreizhan ofanset Doue... Histor ar mevier kollet ganthan he ialc'h. Red eo e ve er gontrision hano ouz Doue ha deuz traou ar bed all ;

3° Ar gontrision a dle beza dreist pep tra.

Seul vrasoc'h e vez ar boan a dennomp varnomp ha seul vrasoc'h ar mad a gollomp, seul vrasoc'h ive hor glac'har.

Hogen dre ar pec'het e koller ar brasa mad ; ar baradoz ; e kouezer er brasa poan : en ifern ; ar gontrision a dle beza eta dreist pep tra ;

4° Ar gontrision a dle beza universel, en em asten var an oll bec'hejou.

Mar d'eo aoualc'h nac'h eur pec'het marvel evit ober kovesion fall, aoualc'h eo ive chomm heb kaout keuz d'eur pec'het marvel evit chomm heb kaout pardon.

Eun den, eur payan a gouezaz klanv. Eur c'hristen mad, eur zant a lavaraz d'ezhan : Bruzunit hoc'h oll idolou ha me ho rento pare. Hag hen bruzuna anezho oll nemet unan, unanik bian, mes kaër dreist ar re all ; da hen-man e talc'he. — Allaz, ne baree ket. Ha drouk ennan e lavare : Perag ober din bruzuna kement a draou kaër. — Marteze n'int ket bruzunet oll ? — Anzaot a rankaz. Kavet eo an idol bian, bruzunet d'he dro, ha kerkent e teuaz ar iec'het.

Petra da ober evit kaout eur guir gontrision ?

1° Goulen ar gontrision digant Doue.

Ar gontrision a zo eur c'hras digant Doue, nebeut a dud a zonj he goulen. — Lavaret atao eur beden benag, goude beza kavet ar pec'hejou evit goulen guir glac'har d'ezho ;

2° Sonjal er pezh a c'hell rei d'eomp eur guir gontrision. — Karantez Doue ofanset, baradoz kollet, ifern meritet, pasion ha maro Jezuz-Krist gouzanvet abalamour d'hor pec'hejou.

Evit ha var gement-man, displega parabolen ar mab prodik.

Ar Zatisfaksion

Facile fructus dignos poenitentiae.

Dougit, evel ma 'z eo dleet, frouez ar binijen.

Pep pec'het, eme zant Aogustin, a rank beza kastizet pe gant ar pec'her he-unan pe gant Doue.

Satisfia a zo :

Dic'haoui an hini a zo bet ankeniet ganeomp, pe great ganeomp eur gaou benag outhan.

Red eo ha red mad satisfia er bed-man pe er bed all.

Er bed-man da genta oc'h ober mad ar binijen roet gant ar c'hovesour. — Dre an oberou mad.

O rapari ar gaou great d'an nesa en he enor pe en he vadou : ar pec'het ne vez pardonet nemet ar gaou a ve raparet.

An Indulgansou

Peurvuia pa 'z eo pardonet ar pec'het e chom da baea eur boan benag da justis Doue evit ar pec'hejou, er bed-man, pe er purkator.

Ar boan-ze a c'heller paea dre ar beden, ar binijen, iün, aluzen... ha dreist oll dre an Indulgansou.

Eun Induljanz a zo eun diskarg a ro an Iliz euz ar boan zo da ober evit paea da Zoue g'oude an absolven. An Iliz a ro an diskarg-se en eur ranna ganeomp meritou Jesus-Christ, re ar Verc'hez hag ar Zent.

An diskarg a c'hell beza roet euz ar boan penn-da-benn : Induljanz plenier pe leun ; pe deuz eul loden hebken.

Evit gounit Indulgansou e ranker :

1° Kaout bolontez hag intansion d'hen ober. Aoualc'h eo kaout an intansion deuz ar mintin evit an deiz penn-da-benn, ma talc'her mad d'ezihi... ;

2° Beza e stad a c'hras, da viana evit an diveza deuz an oberou merket evit gounit an Induljanz.

Beza distag mad deuz pep pec'het ;

3° Ober ar pezh a zo merket var eün ha var hed.

Ar pezh a vez merket peurvuia da ober eo :

1° Kovez. An nep a govez bep pemzeg dervez a c'hell gounit, en Eskopti Kemper, an oll Indulgansou a zigouez adalek an eil kovesion d'eben ;

2° Kommunia. Gant eur gommunion, nemet hini ar Jubile, e c'heller gounit an oll Indulgansou a zigouez en deiz-se, ma rer an oberou all merket ;

4° Pedi. Peurvuia da intansion ar Pap.

Ar beden ordinal eo : Pemp *Pater. Ave* ; hag intansion ar Pap (nemet merket e ve re all) eo :

Ma savo an Iliz hueloc'h bemdez, Breuriez ar feiz, ma kouezo an heretiked hag ar schismatiked, konversion ar bec'herien, ar peoc'h hag an union er bed, oll ezomou an Iliz ;

5° An Indulgansou a rank beza gounezet en dervez hag en amzer merket.

VAR AR BEDEN

Dirigatur oratio mea sicut incensum in conspectu tuo.

Ra bigno, evel moget an ezanz, va feden beteg ennhoc'h.

An den n'eo ket, pep tra pouezet mad, krouet evit klask henoriou, dastum danvez, klask meuleudi ar re all, etc...

Krouet eo bet, dreist pep tra, koulz lavaret hebken, evit savetei he ene.

En dra-ze e ma ar guir skiant; a gostez d'an dra-ze, skiant guirion ebet.

Mes an den, dre he nerz he-unan, ne c'hell ket en em zavetei; red eo e teuffe Doue da rei eun taol penn-skoaz d'ar rod; rak petra omp-ni?

1° Eur gorzen wak, displed;

2° Eur spered amc'houlou;

3° Eur galon techet d'an droug.

Penaoz eta:

1° Kaout harp;

2° Kaout sklerijen;

3° Kaout karantez evit ar mad?

Petite et accipietis, goulennit hag o pezo. En em roit d'ar beden.

Kenta pennad

Petra eo ar beden?

Pedi a zo sevel ar spered hag ar galon varzu Doue, evit her meuli, diskuez d'ezhan hon ezomou ha goulenn diganthan he c'hrasou.

Pouezomp an eil ger goude egile.

1° Pedi a zo sevel ar spered hag ar galon

Traou a zo hag el leac'h sevel an den, hen huelad, hen izella, er c'hontrol.

Guelit an den o vont da bec'hi; he spered, he galon, he oll skianchou en em laka rez-ha-rez gant ar pec'hed ma 'z a da ober. Hogen, pep pec'hed a zo eun dra izel, etc.

Guelit ar micherour, al labourer douar... Ho labour n'eo ket, pell dioc'h eno, eun dishenor evitho... *ut operaretur*; ervez Doue, al labour a zo savet rez-ha-rez

gant ment an den, mes ne zav ket anezho dreist traou an douar; n'ho izella ket, n'ho huelad ket kennebeut...

Lagad ha spered an den a rank, da heul he droad, beza var skouarn ar bâl; anez kementse, al labour a ia a dreuz, etc...

Mes an den, pa bed, a zilez, evel pa lavarfen ar bed-man; he gorf zo var an douar, he spered zo en env.

Ne zonz ket e traou ar bed... sonjal a ra e Doue, e madou an eternite.

Trouz an douar a zo mouget... trouz all ebed nemed hini ar galon leun a garantez, nemet trouz mouez ar feiz douget var diou askel an esperanz beteg an Aotrou Doue.

Eur veach dirazhan e sonjomp peger braz eo, peger zantel, peger galloudek...

Hen adori a reomp, hen trugarekad, her meuli, anzaouez eo hen hor Mestr, etc...

Ober a reomp goudeze eur zell all ouzomp hon-unan. Eaz eo d'eomp anaout:

1° Peger braz eo hon dallentez, pegen eaz eo hon touella, pegen buan e fasiomp...;

2° Peger stank eo an danjerou var hon tro, etc...;

3° Pegen dinerz eo hor c'halon;

4° Pegen douget omp d'an drouk;

5° Pegen hegasuz eo an aerouant, atao var hon tro, o klask an tu da drompla hon ene...

En eur ger, anaout a reomp peger braz, pegen niveruz eo hon ezomou, diskuez a reomp an ezomou-ze d'an Aotrou Doue, evel ma tiskuez an den klanv d'ar medisun, ar gouli a ra d'ezhan poan...

Neuze, ni ker paour all, dirak eun Doue ken pinvidig ha ken madelezuz, a c'houlenn grasou...

Eil pennad

Pegen red eo pedi.

1° Ar bed-man a zo evel eun ograou hag en deffe, pep tra ennan, eur vouez evit meuli Doue. Ar mor, an heol, an oabl a lavar d'eomp he c'halloud: *Cæli enarrant gloriam Dei*; ar ieoten, al loenig disterra a verk he furnez, etc...

Hogen, an den a zo evel an ograouer. An den eo a zo

karget, dre ar renk en euz, da zougen beteg Doue meuleudiou an traou krouet. Pa n'her gra ket, e teu, dre he faot :

1° Da vankout d'ar pezh a dle da Zoue ha d'an traou krouet gant Doue : « *Vanitati enim creatura subjecta est non volens*. Rom., 8-20 » ;

2° Mankout da bedi a zo mankout d'an traou krouet.

A zo, ouspenn, mankout d'eomp hon-unan.

Da Zoue omp : divar dorn Doue e teuomp ; Doue hor gortoz, hag aberz Doue e kavimp ervez m'on devezo great...

Hogen, petra c'hellomp-ni dre hon nerz hon-unan ?

Ar sklerijen a vank d'hon ene... Doue eo hor goulaoen, pedomp eta...

Dinerz omp... *Deus fortitudo mea*... Doue eo va nerz, pedomp eta...

Hent ar vuez a zo digompez, tenn, rust ; Doue eo laouenedigez an ene ; pedomp adarre...

Avêl ar bed a zizec'h ar galon... Doue eo ar berad gliz... pedomp c'hoaz...

An ene aliez blounset, gouliet, lazet... piou her pareo, hen digaso da yeo ? a lavaro : *Lazare, veni foras*, Lazare, deuz er meaz... Pedomp atao...

3° Mankout da bedi a zo mankout da Zoue.

Red eo trugarekad ar madoberour... pedomp evit se.

Doue a zo parfet, eun dever eo hen adori... pedomp.

Doue eo hor mestr hag a lavar : *Orate*... pedomp eta.

Jesus-Christ a zo hor skuer, ha Jesus-Christ « *erat pernoctans in oratione Dei*... » evelthan, pedomp.

Ar zent, tud ar beden... Eveltho, pedomp.

Evelse :

1° Rak ma 'z omp evel ar c'hraouadurik bihan, ha ne c'hell kerzet nemet ouz harp... Pedomp ;

2° Rak ma 'z omp evel ar paour dall hag a rank kaout unan d'he ren... Pedomp ;

3° Rak ma 'z omp pec'herien evel ar Publikan... pedomp ;

4° Ha pa ne vemp ket pec'herien rust, amjest ; danjeruz ha skuizuz eo an hent... Pedomp ;

5° Evidomp oll, kroaziou zo da zougen, pounner aliez... Piou a skanvaio ar zamm ?... Pedomp.

An den a dle eta pedi Doue.

An den ne bed ket a zo eun den ingrat, rak krouet eo bet gant Doue hag ouspenn savet dreist an traou a zo var he dro, evit ma tougo beteg an Aotrou Doue he meuleudiou he-unan ha meuleudiou kement zo bet gant Doue krouet evit mad, plijadur an dud.

Mes, ouspenn ma 'm euz truez ouz ingrateri an den ne bed ket, em euz ive truez euz he zallentez.

1° Petra omp-ni, e gwirionez ?

Eur prenwik douar hirio beo, vare'hoaz maro.

2° Petra hon deuz-ni da ober euz hon tamik buez ?

Eun implij ervez Doue ; lagad Doue hor guel... Pluen Doue a skriv... Balanz Doue hor pouezo...

E tleomp eta ober : Labour vad evit an eternite.

Hogen, ac'hanomp ha dreizomp hon-unan pe seurt labour a c'hellomp-ni da ober ?

1° Deuz eun tu, hor spered a zo eaz da fazia... Aliez heb sonjal re e taolomp had e liorz an ifern.

2° Euz eun tu all : *video meliora proboque, deteriora sequor*... Hor c'halon baour ' zo dinerz...

3° Euz eun tu all c'hoaz, hent ar vuez ' zo digompez, rikluz, amjest... Guenojen ar vertuz, enk, striz... An drouk-spered « *circuit quærens quem devoret*. »

4° Hag eur vech an ene blounset, lazet gant ar pec'hed, penaoz lakad ar vuez da zistrei ?

En tri c'her :

1° Ha kavet e vo eur c'houlaouen da sklerijenna an den amc'houlou ?

2° Eur vaz da harpa ar beachour skuiz ha dinerz, da rei skoazel er pignou tenn, etc...

3° Eur medisin da barea gouliou an ene, da lavaret : « *Lazare, veni foras* », Lazar, deuz er meaz.

Ia, kaout a c'hellomp ar c'houlaouen, ar vaz, ar midisinerenez-se. Nan en dro d'eomp, en traou krouet, mes a zioc'h d'hor penn.

E skoazel Doue, dre nerz Doue e c'hellomp pep tra : *Omnia possum in eo qui me confortat*.

Mes Doue dre justiz ne rank netra d'an den, dre drugarez hebken e ro d'eomp ar pezh a ro.

Hogen, an hini a ro dre drugarez a c'hall, en distro euz

ar pezh a ro, goulenn ar pezh a gar; ha Doue araok hor zikour, a lavar d'eomp : Goulennit beza sikouret.

Ar c'hras da bedi, hebken, a vez roet heb e ve goulennet; an holl c'hrasou all ne vezont roet nemet d'ar beden.

Mes ive, ar beden a zo nerzuz meurbed :

Tri c'her divar benn an nerz-se.

1^o Ar beden a dle beza nerzuz.

2^o Ar beden a rank beza nerzuz.

3^o A beleac'h e teu nerz ar beden ?

1^o Ar beden a dle beza nerzuz.

Eun intañvez gant he bugale... a gavit o c'houlenn aluzen...

Gant truezh outho, tud dianav evidoc'h koulsgoude, aluzen a roit.

Penaoz goudeze e c'halfe Doue chomm heb kaout truezh ouz he graouadurien...

2^o Ar beden a rank beza nerzuz.

An dud a vank d'ho ger, Doue a zalc'h d'he hini... ha Doue en deuz lavaret : Goulennit hag o pezo...

Guelit Heli o tigas sec'hor epad tri bloaz... Moizez o rei, dre he beden, ar gounit da zoudarded Israël.

Dre ar beden e lakomp eur vreac'h da Zoue, ar vreac'h a bardoun, da ziabenn ar vreac'h all, ar vreac'h a sko...

3^o A beleac'h e teu nerz ar beden ?

Pa vez mab an ti a du ganeoc'h, e c'hallit esperout start e teuoc'h a benn euz an tad hag ar vamm.

Mad, pa bedomp, mab an ti a gas hor peden beteg Doue. E leac'h, eme Jesus-Christ, ma vezo daou pe dri, em hano, o pedi, me a vezo en ho zouez.

Setu perak :

Dilezel ar beden (peden dioc'h ar mintin, dioc'h an noz... etc.) a zo eur goall-eur...

Disprijout ar beden eo ar brasa euz a oll goall-euriou an ene.

Jesus-Christ a bede... ha da heul ar skuer a ro e laka ar gourc'hemen : *Sine intermissione orate...*

Ha pa bedomp, Jesus-Christ a bed evidomp ha ganeomp, ha Jesus-Christ a vez atao selaouet gant Doue he Dad.

C'houi lavaro marteze :

« Me a bed ha va fedenn ne vez ket selaouet. »

Perak ne vez ket hor pedennou selaouet gant Doue ?

Selaouit sant Aogustin o lavaret d'eoc'h :

C'houi hag a bed :

1^o Pieu oc'h c'houi ?

2^o Petra c'houlennit-hu ?

3^o Penaoz e rit-hu ho peden ?

Ha kerkent e respount evidoc'h, en hoc'h hano :

1^o Kalz a bed ha ne dint ket, ne c'houlennont ket beza mignouned an Aotrou Doue : *Mali petitis.*

2^o Kalz tud a bed hag a c'houlenn traou noazuz d'ho ene : *Mala petitis.*

3^o Kalz tud a bed, mes ho fedenn n'eo ket great mad, en doare ma fell da Zoue : *Male petitis.*

Hini pehini deuz an tri dra-ze pe ho zri var eun dro, a gas hor peden da goll.

1^o *Mali petitis.* — Guella peden eo kaout eur galon digallar.

Beza eta e stad vad, pe glaskenn em denna ouz ar pec'hed, setu ar pezh a c'hell guella lakad Doue d'hor zelaou.

Setu dirazoc'h eur paour direzoun, etc... ho tispenn a ra... Abarz ar fin hen dilezot.

Evelse ive ar pec'her... ha piau a c'hell lavaret : me n'oun ket pec'her, me !

Guir eo, pa zeu ar boan, ar c'hlenved etc... neuze e pedomp ; mes, pa bedomp e kasomp hor pec'hed d'hon heul. — Histor ar zoudard...

2^o *Mala petitis.* — Kalz a bed heb beza er stad vad :

Kalz all a bed evit goulenn traou noazuz d'ho ene :

1^o Goulenn ar iec'het... mes anezhi e rit implij fall.

2^o Goulenn a rit gounit eur prosez... hag ar prosez a zo disleal.

3^o Goulenn a rit danvez, henoriou. — Ha gantho en em golfac'h.

Sant Aogustin a lavare : Bennoz d'eoc'h, o va Doue, rak ma selaouit ac'hanon ervez guir ezomou va ene, ha nan ervez ioulou faziuz va c'halon.

D'ar pedennou great evit goulenn traou noazuz, Doue a respount : *Laborem mihi præbuiisti iniquitatibus tuis.* Ho pec'hejou, pa bedit, am laka nec'het.

Euruz e venn d'ho selaou ha mar ho selaouan e lakin en ho tourn ar gountel a lazo hoc'h ene.

Respount a reot :

Me ne c'houlennan nemet ar pezh a c'hell plijout da Zoue, etc...

Marteze eo guir. — Piou da damal neuze : pe ar beden a rit, pe an doare ma rit ar beden-ze, rak, eme c'hoaz, Sant Aogustin : *Male petitis...*

Male petitis. N'eo ket awalc'h lavaret : Aotrou. Aotrou... evit mont d'an Env.

Red eo pa beder :

1° Beza mignon da Zoue, pe goulenn he vignoniach.

2° Goulenn ar pezh a zo ervez gloar Doue ha mad an ene.

3° Hag ouspenn pedi evel ma fell da Zoue, rak anez *male petitis.*

Da genta. Pedi gant humilite ha gant respet.

D'an eil. Gant evez.

En aounna lavarfe Doue : *populus iste labiis me honorat cor autem eorum longe est a me.* Lod pa bedont ne bedont nemet evit ober ar c'hiz, heulia ar pleg kemeret, kerzet dre ar memez rouden gant an darn vrasa dez an dud. A bed heb en em zelaou ho-unan hag heb fizianz, heb eur guir c'hoant zoken da gaout digant Doue ar pezh a c'houlennont pe da heulia grasou Doue a vir galon.

D'an trede. Pedi gant feiz ha kenderc'hel da bedi.

Kalz a bed heb dalc'h d'ho feden. Goude pedi eun nebeut amzer e falgalonont ha ne bedont mui. *Si vis, potes me mundare* ; peden ar Gananéen...

Petra da ober evit ma vezo mad hor peden ?

Ma or beuz c'hoant guirion da bedi evel ma fell da Zoue eo red d'eomp :

1° Sonjal ervad a beger braz talvoudegez eo ar beden.

2° Lakad ar spered hag ar galon er stuz ma zeo dleet, en doare deread evit pedi mad.

Da genta. Red eo sonjal a beger braz talvoudegez eo ar beden. — Pe me a raio nao, pe me a raio kazeg, ne ran ket kalz a fêrz ; n'euz netra etre hon taoliou, a lavar an hini a zo o c'hoari da fall.

Da betra poania kement all da ober, er park-man, labour a zoare ? Kaër a vezo, en he-man ne vezo netra vad biken ; a lavar an hini a ra labour aner.

Mes pa lavar eun den : dioc'h ma rin e kavin ; ouz ar pezh az an da ober eo stag va enor, va danvez, va buez, eurusted kement a garan. — Neuze, evit dont a ben d'hen ober mad, e lakit hoc'h oll evez, hoc'h oll izign. hoc'h oll nerz, hoc'h oll amzer.

Er memez tra, ma lavarit :

Da betra poania da bedi ; petra a vad a zigaso d'in-me ar beden ? Neuze e pedot fall.

Ma lavarit evel ma tleit ober :

Ar beden eo baz ar beachour en hent, ar beden eo nerz ar galon er stourmad, sklerijen ar baleer en noz. — En eur ger, ar beden eo alc'houez ar baradoz, neuze e pedot mad, rak lakad a reot hoc'h oll boan evit hen ober.

D'an eil. Red eo araok koumanz ar beden beza en em lakead er stad da c'hellout pedi ervad : *Ante orationem præpara animam tuam.*

N'eo ket pa vez krog an tan-gwall en ti, eo sonjal toulla eur punz evit kaout dour d'her mouga. N'eo ket var eun dachen letoun, douar lann eo hada greun, red eo evit kaout eun dra benag terri an douar a ziagent.

Evelse ive, abarz kregi da bedi eo red evel pa lavarfen dastum he spered hag he galon, serri he ziouskouarn ouz trouz ar bed, dilezel pep sonj all evit sonjal hebken en Doue ma c'h en em erbeder outhan hag er grasou a zeuer da c'houlenn diganthan.

Petra da c'houlenn, pa beder ?

Daou seurt madou a c'hell an den da c'hoantad ha da gaout :

Madou ar vuez-man,

Madou ar vuez da zont.

Ar re genta ne dalvezont nemed evit ar bed-man, ar re all a zo evit an eternite.

Var bouez kement-man sant Aogustin a lavar : *Ne petas a magno parva, magna ora, caelestia ora.* — Penaoz digant eun Doue eternal goulenn madou. bresk an amzer ? -- Penaoz digant Roue an envou goulenn hebken danvez an douar ?

Goulennomp da genta ar baradoz hag ar pezh a zo red

evit her gounit, neuze an nemorant a vezo roet d'eoc'h var ar marc'had.

Goulennomp eta :

1° Ar c'hraz da bedi, an doare da bedi ervad. — Ac'ha-nomp hon-unan ne c'houzomp na petra da c'houlén, na penaoz her goulén. Spered Doue, spered difazi, spered a sklerijen a c'hell hebken hen deski d'eomp.

2° Goulennomp c'hoaz eur vuez e guirionez kristen, eur vuez leun a habaskder, a feiz, a esperanz, a garantez diazezet var eur goustianz leal ha guirion ;

3° Goulennomp ouspenn gras hag harp Doue, evit ma c'hellimp, renet gant he Brovidanz, kerzet atao gant an hent mad.

4° Goulennomp erfin eurusted an envou, kaër awalc'h e vezo al loden-ze : *Non sunt condignæ passionēs hujus sæculi ad futuram gloriam quæ revelabitur in nobis.*

Petra eo poaniou, labourou, kroaziou ar vuez-man dirak ar gloar dreist vuzur a vezo roet d'eomp eun dervez da zont.

Koulsgoude, n'eo ket difennet ouzomp goulén digant Doue madou an douar ; daoust peger bresk int ha pegen nebeut int goest da ober hor guir eurusted, eo red mad ho c'haout evelato evit ober heb re a boan hon treuz var an douar.

Mes ma c'hellomp ho goulén, eo red mad diazeza hor peden var an daou bost-man :

1° Red eo ho goulén evit hor zilvidigez, evit ma raimp anezho eun implij santel, ha n'eo ket evit klask enno peadra da vaga techou fall eur galon direol.

Evit eur guir gristen, ar bed-man n'eo nemed eur gorniel zouar estren, a ranker, dre galz a boan, da dreuzi abarz erruout er vamm-vro.

2° Red eo en em rezolvi d'ar peza a blijio gant Doue. Doue a c'hoar guelloc'h evidomp hon-unan petra zo mad d'eomp. En eur ober skouarn vouzar ouz lod deuz hor pedennou, e tiskouez he vrassa madelez en hor c'hever.

Evit kaout eun desteni anat a gement-man, n'eo ket red mont pell : diskenomp en hor c'halon hon-unan.

Pet guech ha pegeit amzer n'hon deuz-ni ket tourniet an Aot. Doue evit kaout ar peza a zeblante dleout hon lakad laouen hag a zo deut da veza evidomp koulsgoude

eur mean-ruill dindan hon troad, eun drean spérn en hor c'halon, eun tam pri var hon ene paour !

Pet guech all, er c'hontrol, eo, e kreiz ar boan an dris-tidigez, ar c'hlenved, e tistroomp guella ouz Doue.

Pec da vare pedi ?

Evit lavaret mad, hor buez hed-ha-hed ne dlefe beza nemet eur beden.

Koulsgoude e tleomp dreist oll pedi :

1° Da vintin evit trugarekad Doue d'hor beza dalc'hed e buez.

Evit goulén digant Doue an nerz a zo red da gaout evit en em viret, epad an deiz a zigor, diouz pep drouk ha peb pec'het.

Penaoz var iun, kaout nerz da ober labourou tenn ?

Penaoz, heb rei magadurez d'an ene dre ar beden, kaout bolontez start da ziarbenn pep pec'het divar hon hent ?

2° Pedi da noz :

Evit goulén pardon euz ar pec'hejou kometet.

Evit trugarekad euz ar vad hon deuz marteze great.

Evit santifia ar c'houk a zeomp da gemeret...

Eüruz an tiez a vez enno lavaret mad ar pedennou, ha diou vech eüruz ar re a vez pedet enno e kommun.

3° E tleomp dreist oll pedi da zul.

Ar zul a zo eun devez a beden. — Ar beden great en iliz eo ar vella...

Doue zo e pebleac'h, guir eo, koulsgoude an iliz a zo evel he di, eno eo e skuill ar muia he c'hrasou...

Tra poaniuz da lavaret : Lod, epad ar zizun zo tud vad ;... da zul e pec'hont ar muia.

Hogen, koulsgoude, pec'hi a zo atao eur goall dra, mes pec'hi da zul zo eun dra goassoc'h c'hoaz.

1° Ar beden a galon ;

2° Ar beden a c'hinou ;

3° Sin ar Groaz.

Eur c'hristen mad a gar ar beden.

Pedi a ra bep miutin da c'houlén nerz digant Doue.

Pedi a ra var an deiz evit skanvad he labour ha kaout sonj deuz an env.

Pedi a ra da noz evit goulenn pardon deuz ar pec'hejou great epad an deiz, evit trugarekad Doue deuz ar madoberou deuz deuz an env.

Pedi a ra e kammun... Eur fubuen a ra nebeut a drouz, eur strollad fubu a zo ganthan eur voudinel sklintin.....

Karet a ra dreist oll ar beden gommun abalamour da gomz Jesus-Christ : E leac'h ma vezo daou pe dri en em zastumet em hano-me, me vezo en ho zouez.

Ar zul dreist pep tra a dle beza eun dervez a beden evit an oll, siouaz evit kalz ez eo eun dervez a bec'het.

1° *Ar beden a galon.*

Ar beden a galon, a spered pe orezoun a zo evel pa lavarfen :

Eur goazeaden kalon ha kalon etre Doue hag an den, heb ma lavar an den komz ebet a c'hinou.

Guelit daou vignon tál ha tál, avechou, etrezho, komz ebet... eur zell, eur mousc'houarz, eun dorn astennet a lavar muioc'h eget kant ger.

En orezoun e tremen eun hevelep tra etre an den ha Doue.

Guelit an den-ze e troad an aoter...

Leor digor ebet... muzellou kloz... peden ebet great dindan envor... ha koulsgoude pedi a ra, he spered, he galon a gomz heb ma tigloz ar muzellou. Sonjal a ra en uan pe unan a virioneziou ar relijion, er baradoz, en ifern, e madelez Doue, e passion Jesus-Christ, etc...

Hag en eur zonzal en dra-ze, he spered a deu d'en em sklerijenna, he galon d'en em domma, tanva a ra gant plijadur ar virionez ma sonj ennhi... Goudeze ar zantimanchou mad a ziwan en ene evel ma tiwan er parkeier ar greun en douar, dindan an heol tom hag ar gliz.

Varlerc'h ar zantimanchou mad e teu an oberou kristen, evel ma teu, goude ar bleun, ar frouez e bek ar brank.

Setu aze petra eo ar beden a spered : kaozeal kalon ha kalon gant Doue heb komz ebet.

An den heb fichal he deod, a zonz e Doue, en em ginnig da Zoue, a c'houlenn skoazel Doue, en em westt da zervij Doue, ha Doue, heb ma teu teod an den d'her lavaret d'ezhan, a vel petra dremen er galon, hag a zelaou ar

beden vud-se, a bign varzu ennhan, douget var diouaskel ar garantez hag ar fizianz.

Ar zent oll, koulz lavaret, a zo bet tud a orezoun.

Sant Aogustin a lavare : Eur spered hag a zonz mad a zo grizien pep mad.

Santez Thereza a lavare ive : Livirit d'in e reot bendeze orezoun epad eur c'hart-heur ha me a lavaro : Ar baradoz a zo d'eoc'h.

Hag e guirionez, en orezoun e kaver an tri harp guella evit silvidigez an ene.

1° Harp kenta. Petra zonz d'eoc'h-c'houi a c'hell ar guella hon harpa var hent an env ?

Anaout mad an Aotrou Doue ; hen anaout evel hon tad, evit m'her c'harimp evel guir vugale.

Hen anaout evel hor madoberour, evit ma klaskimp gounit ar gurunen a ginnig d'eomp.

Hen anaout evel hor barner, evit ma kemerimp aoun rak ar setanz a zougo eun dervez.

Hogen en orezoun eo e tesker ar virionez-se ar guella ;

2° Evit harpa ac'hanomp var hent ar zilvidigez petra c'hoaz a zo red ?

Red eo en em anaout an unan ; anaout hor zempladurez, hon ezomou, hor mankou, hon techou fall ; *noverim te, noverim me*. Disken er plegou muia kuzet, anaout an dangerou a zo var hon tro.

Evit se eo red teuler evez mad ; heb an evesdet-se e c'halfemp kredi ez omp kristenien vad, ha padal e faziomp hon-unan.

An orezoun eo goulaoen ar goustianz ;

3° Petra erfin a c'hell hon harpa ?

Anaout hon deveriou e kenver Doue, hon nesa hag en hor c'henver hon-unan.

Evit dont a benn da anaout mad kementse e rankomp sonjal mad e lezen Doue, n'eo ket aoualc'h he deski, red eo he entent, he c'hompren, anaout petra eo, petra dal, pegen red eo he heulia, peuaou ober evit chomm heb he zerri... eo red en eur ger, beza tud a beden.

An orezoun, ouspenn ma teu d'hon harpa en eur sklerijenna hor spered, a deu c'hoaz d'hon herpa en eur generza hor c'halon.

An dud hag en em blij o pedi a spered, a gav en eur gaozeal gant Doue guir laouenedigez an ene.

Avechou e chommomp souezet en eur zonjal o deuz ar zent tanveat ker braz levenez e kreiz brasa poaniou ar vuez-man. Unan a lavare : *superabundo gaudio in omnibus tribulationibus meis*. Levenez em euz dreist penn e kreiz va oll foaniou... Unan all : *Aut pati, aut mori*. Pe gaout poan, pe vervel...

Unan all c'hoaz : Pe vianait va levenez, pe ledanait va c'halon.

Hag ar Spered Santel he-unan a lavar d'eomp d'he dro : *desolatione desolata est terra, quia mellus est qui recogitet corde*. Ar penn kaoz deuz an dristidigez a c'holo ar bed oll, eo rak neuз koulz lavaret den hag a zonjfe a vir galon.

Hag e guirionez, kalz tud so hag a ra vâ da bedi, ha zoken da bedi mad ; eul leor a zigoront, eur brezegen a glevont... diou skouarn ha daoulagad ar c'horf a zo digor, mes diou skouarn an ene, ar galon a zo serret, ha neuze eo guir lavaret deuz an dud se : *labiis me honorant cor autem eorum longe est a me*.

Arabat eo digarezi :

Ni labourerien douar, micherourien, tud divar ar meaz, penaoz e rafemp-ni orezoun ?

Klevet oc'h euz ar c'hantik : *Aman pell deuz an trouz hag oll safar ar bed ; ar meziou hor c'helen kerkoulz hag an habilla doktored, etc... An noz steredennet... an oal digoc'hen... ar bleun er prajou..., ar skoud-tan var an oaled... eun eunik o kana var ar bank, pep tra a gomz a Zoue, hon doug da zonjal e Doue...*

Penaoz, ni tud dizesk, gallout ober orezoun ? N'euz ezom ebet nag a leoriou nag a zeskadurez vraz evit ober orezoun ; auale'h eo anaout er relijion ar peñ a zo red da c'houzout : anaout ez euz eun Doue, gouzout on deuz ezom deuz he c'hrasou, gouzout e ro harp d'an nep her ped, etc.

2° Ar beden a c'hinou.

Ar beden a c'hinou eo an hini a reomp dre gomzou lennet en eul leor pe desket dindan envor ganeomp ; er beden-ze, an daoulagad a lenn pe ar muzellou a gomz.

Ar beden a galon hag ar beden a c'hinou a zo evel daou vranc savet var ar memez korf gouezen ha galvet

da zougen ar memez frouez ; ho diou e tleont tenna bennoz Doue varnomp.

Setu aze eur paour keaz hag a zeu heb lavaret ger, da asten d'eoc'h he zorn, n'euz o parlant nemet he zillad paour he zaoulagad beuzet a zour, he ziu voc'h toulllet gant an dienez, ho pedi a ra petra benag ne lavar ger.

Mar teu ouspen da lavaret : Oh c'houi hag oc'h euz da ziweret, ro pezo truez deuz an ezomek ; e ra c'hoaz eur beden, mes eur beden a c'hinou.

Eur perz mad a zo er beden-man, rak ar c'homzou a leveromp a vir ouzomp da veza ken dizonj.

Mes da zival ez euz ive deuz eun dra noazuz braz : da gaout aoun ez euz na jomfe ar galon mud epad ma parlant ar muzellou, hag ar beden a c'hinou pa ne vez ket ar galon da heul ne dalv netra, koulz lavaret, dirak Doue.

Ne gomzin ket deuz an oll bedennou a c'hinou a zo ar gristenien boazet da ober. Beza ez euz teir hag a ve an alies a lavaret etouez an dud fidel.

Euz anezho, bep eil tro, ez an da lavaret eur gomz verr :

1° Sin ar Groaz.

2° Ar Batez.

3° An Ave Maria.

1° Sin ar Groaz.

1° Petra eo sin ar groaz.

2° Penaoz e rer sin ar groaz.

3° Peseurt nerz en deuz sin ar groaz.

4° Pegoulz ober sin ar groaz.

1° Petra eo sin ar groaz ?

Sin ar groaz eo sin ar c'hristen.

Eun dervez eur vezen a oue diskaret. . . Great e oue ganthi, n'eo ket eun ti, nag eun or, etc. . . mes eur groaz.

Var ar groaz-se Jesus-Christ a varvaz. . . *Cum exaltatus fuero omnia traham ad me ipsum*. Pa vezin savet, me a denno kement so d'am c'haout.

Else : an dud a zonje d'ezho, en eur lakad Jesus-Christ d'ar maro var eur groaz vezuz, distruja da viken, hen, he lezen hag ar zonj anezhan. . . ha pa dal ar groaz a zo deut da veza eun trôn a c'hloar evit Jesus-Christ.

Ar groaz goude beza bet evel eun aoter, prenet ar bed varnezhi dre sakrifiks Jesus-Christ, a zo deut da veza drapo ar gristenien, da veza *merk ar c'hristen*.

Pep micherour, pep labourer... en deuz eun arouez, eur merk hag a ro d'anaout petra eo... ar zoudard, ar mear... an archer, an noter...

Pep bro e deuz he yez, he guiskamant... mes kristenien a zo e peb bro, e peb stad, etouez ar re baour, ar re binvidig, ar vicherourien, an dud a leve... penaoz ho anaout?... dre sin ar groaz.

Dre sin ar groaz e vez badezet ar c'hraouadur bian... sin ar groaz eo kenta peden a zesk, ar genta peden a ra... an diveza peden a zilez. Ar groaz hen diouallo en he vez, ebarz ar vered.

Ar groaz a zo, ouspen, merk ar broiou kristen... Ar groaz var galon ar zoudard kalonek... var bruchet ar skolaer studiuz... var ilizou an Aotrou Doue... Pa ziskarer ar c'hroaziou ez eo dija diskaret ar feiz...

Sin ar groaz a zo roet d'eomp evit merka piou omp, bugale Doue. E Doue ez euz tri ferson :

An Tad, en deuz hor c'hrouet.

Ar Mab, en deuz hor prenet.

Ar Speret-Santel, a zeu d'hor santifia.

Dre zin ar groaz e rentomp eta meuleudi da dri ferson an Drindet. Ouspen, piou ac'hanomp ne gav ket, hed he vuez, eur groaz benag da zougen. Euruz omp rak-se da gaout dirak hon daoulagad kroaz menez Kalvar. Sellet mad outhi a zo kaout nerz da heulia hent ar C'halvar.

2° Penaoz ober sin ar groaz, pe evit lavaret guell, perak e reomp-ni sin ar groaz er c'hiz ma reomp ?

Hor spered a zo roet d'eomp evit anaout ha meuli Doue.

Hor c'halon evit karet Doue.

Hor c'horf evit servicha Doue.

Hogen, an tal eo ti ar skiant, ti ar spered...

Ar galon eo lojeiz ar garantez.

An diou skoaz eo daou beul an nerz, daou aël braz al labourer; setu perak e kassomp hon dorn d'hon tal, d'hor c'halon ha d'hon diou skoaz evit merka ez omp servicherien Doue.

3° Peseurt nerz en deuz sin ar groaz ?

Eun devez Constantin o vont d'ar brezel a eneb Maxence,

a velaz en ear eur groaz skeduz ha merket varnezhi : *In hoc signo vinces*. Ni ive a ia d'ar brezel... ha d'eomp-ni ive eo guir lavaret : *In hoc signo vinces*, dre ar merk-man o pezo an trec'h.

Sin ar groaz a bella an drouk-sperejou... a zinerz hon tēchou fall... a denn bennoz Doue varnomp ha var ar pez a reomp... hag oll on deuz ezom a vennoz Doue...

4° Pegoulz ober sin ar groaz ?

Da vintin pa zihunomp. Kenta ra eur zoudard abarz mont en hent varzu he enebourien eo kregi en he armou.

Araok ha goude ar pred.

Araok staga gant al labour evit santifia ar pez a reomp.

Pa en em gaver e kreiz eun danjer benag...

Maleur d'an nep en deuz mez oc'h ober sin ar groaz dirak an dud, rak, eme Jesus-Christ : An hini en devezo ruziet abalamour d'in-me dirak an dud, me a nac'ho anezhan dirak va Zad.

2° Ar Bater.

Goude sin ar groaz kenta peden a zesker, ar beden anavezet gant an oll eo ar **Bater**.

Eun diskib a zeuaz eun devez da lavaret da Jesus-Christ : *Doce nos orare*, deskit d'eomp pedi.

Hag hor Zalver a respountaz : Pa bedot, pedit evelhen : *Pater noster, qui es in cœlis*, etc.

Ar Bater eo eta peden hor Zalver, great ganthan he-unan evit he vrasa mignoned. Setu perak en deuz ennhi dastumet hon oll ezomou, ezomou ar c'horf, ezomou an ene.

Setu perak ive, e penn kenta an Iliz, e touget d'ar beden-man, kement a respet ha d'an Hosti zakr he-unan.

Peden nerzuz eo, rak selaouet e vez gant Doue, abalamour ma 'z eo dirak Doue evel eul lizer-kred roet d'eomp gant Mab Doue he-unan.

Hon Tad. Eur gomz, diou gomz a zo e pep iez, diou gomz leun a fizianz : va zad, va mam...

E c'helje beza lakeat : krouer, mestr, barner... e leac'h tad. Nan, fizianz a fell d'ezhan or be, setu perak e lavar : hon Tad.

Hon Tad ha nan va Zad...

César o tremen menezioù Alpes, etc... Tud d'in-me, netra da zen, evelse e komz an den...

Mes peden ar c'hristen a zo ledannoc'h rak ma 'z eo frankoc'h he galon, lavaret a ra : Hon Tad.

Hon Tad pehini a zo en Env. Doue a zo e pep leac'h... mes ar bed-mañ n'eo ket hor bro ; hor bro a zo d'an eac'h, en envou, ha J. K., e penn hor peden a fell d'ezhan distaga ac'hanomp deuz an douar.

Goude beza great d'eomp anaout varzu piou e kasomp hor peden ha penaoz en em gemeret evit plijout da Zoue, J. K. a zesk d'eomp petra da c'houlén.

Kenta goulen ar Bater : *Sanctificetur nomen tuum.* Da lavaret eo :

1° Ra vezo hoc'h hano anavezet ;

2° Ra vezo karet ;

3° Meulet gant an oll dud.

Kenta deskadurez... anaout Doue.

Guella karantez... karet Doue.

Talvoudusa meuleudi... meuli Doue.

Eil goulen ar Bater : *Adveniat regnum tuum.*

1° Ra zeui Doue da ren en hor spered dre ar feiz, en hon izili dre an doujan. Guir Doue eo rên var he graouadurien... mad he graouadurien eo lezel Doue da rên : *Servire Deo regnare est ;*

2° Ra zeuimp d'hon trô, dre veritou eur vuez gristen, da rên, eun deiz da zont, gant Doue en he varadoz. Komz e Villars var he vele a varo.

Ra zeuio Doue da rên e spered ha kalon pep den, e spered ha kalon pep bro, en hor c'halon ; e spered ha kalon tud hor bro.

Ar pezh a c'hellou guella hon lakad da zont a benn a gementse eo.

Trede goulen ar Bater : *Ober-bolontez Doue.*

Divar benn an dra-ze, pevar ger :

1° Petra eo bolontez Doue ?

2° Pegen red eo evidomp ober bolontez Doue ?

3° Betek pegeit ha var betra en em asten bolontez Doue ?

4° Penaoz ober ervad, evel ma 'z eo deread, bolontez Doue ?

§ 1° PETRA EO BOLONTEZ DOUE ?

Doue a zo teir guech santel. Hogen hor great en doa, er

penn kenta, henvel outhan. Setu perak : « *Hæc est voluntas Dei, sanctificatio vestra.* »

An nemorant a zo traou deuz an eil renk, en em zantelad eo an dra genta, an dra red, heb mui ken.....

§ 2° PEGEN RED EO SENTI OUTH ?

Red eo senti deuz bolontez Doue dindan boan da veza kollet.

Peb tra en dro d'eomp a ra bolontez Doue... ar mor, an heol, ar c'houmoui, etc. An den hebken a c'hell lavaret hag a lavar : *non serviam.*

Doue a zo mestr d'he zonezonou, ho c'hinnig, ho rei a ra, ia gant ma reor ar pezh a c'houlén.

Kement hini a lavar : « Aotrou, Aotrou, ne daint ket d'ar baradoz mes hebken, eme J.-K., an hini a rai bolontez va Zad, a zo en Env. »

Bolontez Doue a dle beza hor reolen : reolen hor spered : kredi ervez ar volontez-se.

Reolen hor c'halon : karet... reolen hor c'horf... ober... sonjou, komzou, oberou, pep c'hoant stumet var-nezhi.....

Ma teu unan benak da c'houlén eun dra a eneb bolontez Doue, lavaromp : guell eo disprijout d'an dud eget disprijout da Zoue.

Ne lavaromp mui : red eo senti deuz ar mestr... ia deuz ar mestr braz, hag ar mestr braz eo Doue. Guelit an Ebestel... ar verzerien... ar zent oll.

Senti deuz an dud er pezh a zo ervez Doue, dizenti er pezh a zo a eneb Doue.

§ 3° BETEK PEGEIT EN EM ASTEN BOLONTEZ DOUE ?

1° Var lezen Doue hed-ha-hed. « Diskennet oun, eme J.-K., evit ober bolontez va Zad ; senti eo va bara pem-deziek. »

Ne dleomp ket ranna lezen Doue : *qui peccat in uno, factus est omnium reus.* Arabat ober he anter ha lezel ar Pask...

Arabat kredi ez eo mad mont d'an oferen ha labourat goudeze... tout pe netra...

2° En em asten a ra var oll boaniou ar vuez... J.-K. er jardin olivez... eur c'halur c'hoero meurbed ha kouls-goude : « *non mea voluntas, sed tua fiat.* »

Karantez Doue a vianaio c'hoerder ar c'halur-ze ; argila, en eneb, a ve kreski ar boan. *Ubi amatur non laboratur.*

A hent all red e vezo atao plega, rak kaout poan a zo tra red...

3° En em asten a ra var gement a zell ouz hor stad a vuez.

Doue en devez he zoursi ha ni hon hini ; hor zoursi-ni eo a dle plega.

Unan a c'houlén choum er bed... Doue her galv d'ar gouent.

Doue a oar ar guella petra zo mad evidomp.

Ar pezh a c'houlennomp ni a vez aliez evidomp penn kaoz a valeur.

Goude tout, an den a lavar : me raio ; ha pa dalv, Doue eo a ra...

§ 4° PENAOZ SENTI OUZ BOLONTEZ DOUE ?

Evel ma vez sentet outhi en env...

1° Dioc'htu, heb gortoz, heb argila... Dale a ve biannat ar merit ;

2° Hed-ha-hed, heb mont en tu all, heb choum en tu-man, er c'hiz ma c'houlén Doue, ha dre an hent a lavar ;

3° Gant joa. Eurusted ar zent eo senti, plega, meuli ; ni ive a dle plega hor spered, hor c'haloun, gant prez ha gant joa, en despet d'ar bed, d'ar c'hig, d'an drouk-spered.

Ober atao bolontez Doue — hed-ha-hed, — en despet d'ar poaniou ha choum heb ober netra nemed diouthi.

Hor rekompantz neuze a vezo peoc'h ar goustianz er bed-man, ha baradoz Doue er bed all.

Pevare goulén ar Bater : *Panem nostrum*, etc.

En tri goulén kenta, on deuz pedet evit ma c'hellimp beza e kever Doue ar pezh en euz Doue guir da c'hortoz euz hor perz.

Goude beza evelse d'esket d'eomp e tri c'her hon tri brasa dever e kenver Doue hag e kenver hor planeden er vuez da zont, Jesus-Krist a ra eur zell var ar vuez-man hag a lavar : *Panem nostrum quotidianum* :

Pevare goulén ar Bater : Petra zesk d'eomp ar gomz-man ? Er penn kenta e c'hellfemp kredi ne zell

ar goulén-man nemed ouz ar re baour... Mes dirak Doue pep den a zo paour, rak Doue a c'hell lakad da deuzi pa gar pinvidigezou ar pinvidik.

Sellet a ra eta deuz an oll, ha d'an oll e tesk an dra-man, da genta :

E c'hellomp goulén madou ar bed-man.

A dra zur ni zo heritourien ar baradoz, rak-se e tleomp lakad en eil renk madou bresk ar vuez-man ha klask dreist peb tra madou an eternite.

Koulsgoude, ar bed-man a zo evidomp ar pezh ma 'z eo evit eur beachour : eul lochennik savet ganthan da dremen eun nosvez.

E c'hellomp eta goulén ma vezo al lochennik deread ha mad evit an tamik amzer a dleomp ennhi trémen.

Mes hor goulén a dle beza ervez bolontez Doue.

Ar pezh a zeblant d'eomp-ni beza aliez eun dra vad, eun dra red, ne vez avechou hag e guirionez nemed eun dra didalvoud ha noazuz.

Doue ne dle ket eta neuze hor zelaou.

Eun dra zo : unan hebken hag a dleomp da c'houlén, seul priz seul miz, hag an dra-ze eo silvidigez hon ene. An traou all... Iudu, poultren... « *Porro unum est necessarium.* »

Hor goulén a dle beza muchet gant furnez. — Arabat goulén atao en tu all d'ar pezh so mad, d'ar pezh so red, *habentes alimenta et quibus tegamur, his contenti sumus.*

Ne roit d'in, eme ar fur, na pinvidigez, na paourentez, roit d'in eul leac'h kreiz etre paourentez ha pinvidigez.

Panem da nobis hodie, ar pezh so red, netra ken.

Nostrum... d'in, d'ar re zo em zi d'ar re zo tro var dro, zoken d'am enebourien. *Quotidianum*... hirio ar pezh so red evit hirio, ne dlean ket goulén en tu all, abenn varc'hoaz me a vezo marteze maro.

Varc'hoaz mar bezan beo, me a c'houlénno en dro ar pezh a vezo red evit varc'hoaz. C'houi a fell d'eoc'h e ve goulennet bemdez ha bemdez, me a c'houlénno.

Roit... c'houi eo ar mestr kement so, d'eoc'h eo da rei pe da nac'h, pa zerrit ho tourn netra na deu, pa zigorit ho tourn pep tra a gouez.

Mes, siouaz, ar goulén-man a zeu da varn aleiz a dud.

Barn a ra ar pedennou dibreder. Ped guech ne c'hou-
lennomp-ni ket traou didalvoud, traou noazuz ?

Kenta mank. — Pa vezont roet d'eomp ni a dro anezho
a eneb Doue.

Eil mank. — Pa vezont nac'het ouzomp ni a damall
Providanz Doue.

Barn a ra ar pedennou digristen. Goulen a reomp beza
guisket kaër, maget dibreder... beva er fouge...

Barn a ra ar pedennou direzoun. Lod e leac'h poania
da c'hounit ho bara gant ho labour, a lez, dre re vraz
fizianz e Doue, al labour a gostez... En em zikourit ha
Doue ho sikouro.

Barn a ra buez an dud a zizurz. Lod var zigarez beva
en ho eaz a verz ho ene dre ar pec'het.

Barn a ra an den mac'hounuz, a glask atao bernia.
N'eo ket aoualc'h dastum madou evit ar bed-man, red eo
dastum evit an eternite.

Barn a ra ive an dispigner. Micherourien pa o deuz
gounezet arc'hant a lavar avechou : bihan pa vezo, bihan
pa ne vezo, bihan atao. Ha neuze e frikont en eun dervez
gounidegez eur zizunvez, ha goudeze e c'hlaouront gant
an naoun.

Evelse, ar forc'h da fuilla danvez n'eo ket mad, ar ras-
tell da rastellad arc'hant, n'eo ket guelloc'h... Histor
Lazar hag ar falz pinvidig...

Dreist pep tra, ar goulén-man a zesk d'eomp eo red
maga an ene : *non in solo pane vivit homo.*

Maga ar c'horf, guiska ar c'horf ha dilezel an epe a zo
evel pa lavarfen dougen dindan ar gazel eur votez vrao,
kelc'het kaër ha tachtet mad, ha kerzet diarc'hen dre ar
mein hag an drez.

Koulsgoude nag a bet a zreb ho zri fred bemdez hag a
lez ho ene da iün : na peden dioc'h ar mintin, na peden
araok ar pred, na peden dioc'h an noz.

Pet zoken hag o deuz dianavezet an hent a gas betek
an daol zakr, e leac'h ma kavomp koulsgoude guir vaga-
durez an ene. Pet, pa stok outho eur boan benag a vez
gantho mall da glask medisin... ha pa gouezont er pe-
c'hed e choumont ennhan da loueda.

PEMPED GOULEN : *Et dimitte nobis debita nostra.*

An hini ne bardoun ket n'eo ket euruz.

Hag a bet ti a zo ennhan pep tra... Arc'hant ne vank
ket, dillad mad a zo, bara fetiz var ar planken...

Eun dra a vank : n'oar ket eüruz, perak ? — Abalamour
ne vever ket e peoc'h.

Ar peoc'h eo soursen ar guir eurusted.

Jesus-Krist o pignat en env a lavare : *pacem relinquo
vobis, pacem meam do vobis.*

Mes evit beva e peoc'h eun dra zo red : pardouni.

E peleac'h e ma an den n'en deuz mank ebet...

Ar peoc'h gant Doue, gant an nesa, ganeomp hon-unan
eo guella frealzidigez ar galoun.

An hini ne bardoun ket n'eo ket just. E peleac'h e ma
an den n'euz ezom ebet da veza pardounet. Grit eta d'ar
re all ar pezh a garfec'h a ve great d'eoc'h.

Ouspenn zo : Ha ker braz eo mank an nesa a ma sonj
d'eoc'h ?

Nag a bet gwal deod a zav kounchennou divar benn
netra ? Gant eur gomz bilimuz hebken e chenchont liou
d'an traou, deuz eun duriaden c'hoz e reont eun dossen
ken huel hag eun ti.

A hent all, ha beza e ma tout ar mank e tu ar re all ?
marteze c'houi a c'houezaz an tan da genta. Pe mar deo
bet c'houezet gant re all c'houi a zo bet ar vegin o planta
avel da lakad an tan da gregi gwasoc'h-gwaz.

Mar e ma kount evelse, perak ne bardounit ket ?

Lakomp e ma ar mank a bez deuz an tu all... start eo
pardouni, ia, kaout a ra d'eomp e ve eun dra plijaduruz
en em venji ha rei koll evit koll.

Pelloc'h ez an : ac'hanomp hon-unan n'hellomp ket
pardoni. Ar baianed a lavare : lagad evit lagad, dant evit
dant. Me lavarfe eveltho...

Koulsgoude red eo pardouni, rak an nep ne bardoun
ket n'eo ket eur guir gristen.

Jesus-Krist a lavare : *Mandatum novum do vobis : ut
diligatis invicem sicut dilexi vos.*

Ar merk a ziskuezo pe c'houi a vezo ia pe nan euz va
zervicherien, eo diskuez karantez an eil evit egile.

Hag e veac'h o vont da gas prof d'an iliz, mar deuz kasoni en ho kalon, lezit ho prof hag it d'en em unani da genta.

Ma pardonit e viot pardonit, ma ne bardonit ket, evidoc'h ive pardon ebet da c'hortoz ; hoc'h-unan en em varnit.

Sicut et nos dimittimus debitoribus nostris.

Setu aze ar gourc'hemen ; setu aman ar skuer :

« *Pater ignosce illis nesciunt enim quid faciunt* »...

« *Nec ego condemnabo te* »... « *Cor unum et anima una.* » Guelit penaoz en em garont.

